

IMBROURCH



un hent
a gavan

pe a zigoran

30 JU 1971

kelaouenn

bolitikel

niv. 22-23

IMBOURC'H, KE LAOUENN BOLITIKEL

Niverenn 22 - 23

30 Du 1971

Raklavar.....	p.249
Devezhioù-studi SKOL AN EMSAV e Bulad.....	p.251
Ar vaourion hag an Emsav e Breizh.....	p.255
War-du ar bloavezh daou-vil gant Jakez ar Bihan...	p.259
A-dreuz lenn gant Kervorc'h.....	p.261
Bodadeg-veur ar C'hevren keltiek.....	p.262
Levr-bloaz ar C'hevren keltiek.....	p.263
Dislavaroù an Emsav. Eil pennad : dislavar ar yezh hag ar sevenadur.....	p.265
Ar yezh hag an Emsav, prezegenn distaget gant Pol Kalvez e K.E.A.V. 1971 e Kerhan.....	p.272

Ar pennadoù embannet gant izili EMSAV AR BOBL VREZHON
ebarzh IMBOURC'H ne enouestlont ket an aozadur e unan/

Koumanant .-bloaz : ugent lur (20 ur). K.R.P. Y. Ollivier,
1 534 25, Roazhon. Deraouiñ a ra ar c'houmanant-bloaz e miz
Genver. Priz an niverenn 2,00 lur. Ar pennadoù hag al lizh-
iri a zo da gas da EMSAV AR BOBL VREZHON (IMBOURC'H), 30
leurgêr al Lisoù, ROAZHON.
CPPP : 50 015

RAKLAVAR

Dont a ra an niverenn-mañ er-maez
e stummun niverenn daouek a-benn
tapout an dale a oa bet kemeret
gant ar gelaouenn e-kerzh ar bloaz.
Diwar vremañ e vo klasket embann
pep niverenn a-raok dibenn ar miz.

Bez e c'hell ar goumananterion
kas o adkoumanant adal bremañ
d'an hevelep kont-red bepred o
c'hortoz ma vo termenet un niverenn
a-ratozh evit IMBOURC'H.

DEVEZHIOU - STUDI SKOL AN EMSAV

E BULAD, Gwengolo 1971

E miz Gwengolo ez 'eo bet dalc'het devezhioù studi SKOL AN EMSAV e Bulad, adal ar 5 betek an 9 a viz Gwengolo 1971 ; an eil dalc'h eus Devezhioù-studi SKOL AN EMSAV e-pad an hañv e oa hemañ.

Eizh den warn-ugent a zo en em gavet en devezhioù-studi-mañ. Ent keitat ez eus en em gavet 20 perzhiad bemdez : c'hwezek e-kerzh'an daou zevezh kentañ, ha pevar-warn-ugent en daou zevezh diwezhañ.

Abalamour da gement-se n'eo ket bet ingal niver ar rummadoù. E-pad an daou zevezh kentañ e voe lodennet ar studierion e tri rummad :

- A - Deraouidi dizesk (5 skoliad)
- B - Deraouidi (3 skoliad)
- D - Rummad uhel.

En diwezh e voe rannet ar berzhidi e pevar rummad. Ouzhpenn-se e oa bet aozet ar rummad K a oa hini anar vrezhonegerion.

Bet e oa kempennet ar roll-labour evel-henn : kentelioù da veure (9 eur - dek eur hanter ; unnek eur - kreisteiz) ; kendaelioù pe vodadoù-studi adal div eur hanter. Eus 11 eur betek 12 eur e veze graet kentelioù arbennik : konterezh, istor, armerzhouriezh.

Gant ar rummad D e veze prientet ar c'hendaelioù pe ar bodadoù-studi pe droet ur pajennoù bennak eus al levrig "Sous-développement". Graet e voe er rummad-se div gentel arbennik, unan war an douarouriezh-douaroniezh gant

Lukian Kergoat hag eben war an denelouriezh hag ar
frammadelouriezh gant F. Kerren.

Ar c'hendaelioù pe ar bodadoù-studi a bade
hervez pegen founnus pe get e oa menozioù ar berzhidi
hag ivez pegen techet e vezent da vurutellañ pe get.
Kroget e veze war-dro div eur hanter pa oa bet tu da
lakaat ar velldroadeion da baouez gant o c'hoari. Danvez
ar bodadoù-studi a voe :

- d'al lun : perak e tesker hag e teskit-c'hwi
ar brezhoneg ;
- d'ar meurzh : petra eo SKOL AN EMSAV (kendael);
- d'ar merc'her : peseurt menozioù (pe gudennoù)
zo gant an dud e Breizh (bodad-studi)
- d'ar yaou : devozhioù-studi Bulad (kendael).

O vezañ ma oa un toullad skolidi ha na ouient tost
netra e brezhoneg e rankjomp, siwazh, ober ar c'hendaelioù
e galleg. Evit ar bodadoù-studi e voe lakaet an holl
"c'hallegerion" en ur bodad a veze graet e galleg eta, e-keit
ma veze graet ar re all e brezhoneg. E galleg e veze graet an
danevelladur.

Petra a zo bet displeget ?

War an danvez kentañ ez eo bet merket pouez an
endro breizhek (pe yezh pe levrioù bennak pe anvioù pe emzalc'h
ar C'hallaoued en hor c'hevêr). Ar re nevez, peurliesañ, ne gavent
abeg-pal ergorel ebet met un nebeut o deus klasket displegañ penaos
e oa stag stourm ar yezh ouzh stourm ar vro, hag a-geveskemm.

Diwar-benn SKOL AN EMSAV.:

Aet eo ar gaoz dreist-holl endro da dri

c'hraf:

- Diforc'hioù etre SAE hag al luskadoù
sevenadurel ;

- burutelladur danvezioù ar Skol Eil Derez
dre lizher ;

- al labour a ginnigfemp d'ar re nevez deuet.

Respontet eo bet e oa diforc'het S.A.E. diouzh
al luskadoù sevenadurel dre ma oa ar brezhoneg evidomp ur
benveg ha n'eo ket un danvez studi nemetken, dre ma klask diskouez
ivez (hep kemer disentezioù war dachenn ar politikerezh)
pegen stag eo tonkad ar yezh hag hec'h amzer-da-zont ouzh
tonkad Breizh hec'h unan, dre ma lakaomp ar skolidi da brederiañ
war holl gudennoù Breizh.

Burutellet eo bet danvezioù ar Skol Eil Derez ha
merket eo bet gant skolidi zo ne vefent ket plijet tamm ebet
o studiañ evel er skol c'hall riezou estren met e vefent
dedennet kentoc'h gant studi Breizh ,hag he darempredoù gant
ar bed.

Peseurt labour a ginnigemp ? Respontet e voe e
oa da gentañ holl da stourm evit Breizh hervez degouezh pep
hinienn. Daou dra a ginnigemp er pleustr :

- en em stummañ dre wellaat hor prezhoneg, dre
ledanaat hoc'h anaoudegezhioù war gudenn Vreizh ; kement-se
dre al labour hiniennel, dre heuliañ kentelioù SKOL AN EMSAV
ha dre gemer perzh en Devezhioù-studi.

An trede deiz a voe gouestlet a-benn ar fin, dre
an destenn a voe kinniget da vreutaat, ha dre imor an dud,
d'un doare digoradenn d'ar c'hudennoù kevredigezhel hag
armerzhel.

E-pad an devezh diwezhañ e voe divizet diwar-benn
an devezhioù-studi ; ur c'hlozadur a voe roet dezho ha dre se
erfin ar rentañ-kont-mañ en un doare klozadur.

=====

Goude koan e veze amzer vak da ziverrañ a-gevret.
D'ar sul da noz ez omp aet da Gallag d'ar fest-noz ; d'al lun

da noz da Garnoet. D'ar merc'her hon eus graet ur fest-noz en ur gêr eus Bulad, en ur park eus familh ur studierez anavezet ganeomp e Roazhon. Tud eus an trowardroioù a oa deuet. En tri fest-noz, kanerion ac'hanomp a gane kanaouennoù emsaveloc'h eget "Dañs ar pot an fer...", elese "Emgann Montroulez," "le sort du paysan...", "ar "rejionalizasion..." h.a.

Kendael an deiz diwezhañ a voe - evel m'hon eus merket - burutelladur an Devezhioù-studi ha kinnigoù evit an amzer-da-zont.

Heñvel a-walc'h e voe kudennoù Devezhioù-Studi Bulad ouzh re an Devezhioù-Studi dre vras. Meizet eo bet e oa start kenañ : d'ar re yaouankañ a labourat a-hed an devezh ; ar re goshoc'h ivez n'hallont ket chom hep klask diduamantoù daoust ma lavaront ez int youlet start da labourat a-hed an devezh.

Meneget eo bet ivez ne oa ket peurvut kenurzhiadur al labour. Ne oa ket aozet a-walc'h an Devezhioù-studi en a-raok. Re ziwezhat eo bet kavet al lec'h ha ne oa ket darempred a-walc'h être ar gelennerion a-raok an Devezhioù-Studi. En amzer-da-zont eta e vefe gwell gouzout en a-raok lec'h ha koulz an Devezhioù-studi. Rakprientiñ ar c'hentelioù a zo ken ret all.

Ar poent diwezhañ a voe an darempredoù gant "tud ar vro". Bez ez eus bet anezho e Bulad dreist-holl e ser ar fest-noz bihan kaset endro ganeomp. Met peseurt doareoù a vefe ar re wellañ da genlabourat gant tud an trowardroioù ? E ser an Devezhioù-studi ordinal n'eo ket aes rak bez e vez kalz a dud yaouank a-gevret. Ar pouezusañ, da gentañ, eo, kazi sur, bezañ degemeret ha diskouez dre hor bezañs hor youl. Adal neuze e c'hell bezañ frouezhus an darempredoù skoulmet diwar se. Kinniget eo bet ivez e vefe aozet kampoù labour da sikour an dud diwar ar maez, da skouer.

Ar seurt kudennoù a vo da studiañ, kazi sur.

Gant kimiadeg tud leun a youl-vat ez echuas Devezhioù-Studi Bulad.

I.G.

-----)-)

A R V A O U R I O N H A G A N E M S A V E

B R E I Z H

Embannet eo bet danevell ar vaourion e Breizh gant ar spi en dije roet tro d'an Emsaverion da brederiañ diwar-benn o saviad politikel-int o unan ha da verzout dibarelezh al labour politikel o deus boulc'het e-keñver al luskadoù kleizelour, da skouer, peogwir ez eo bet tonket dezho kejout gant izili al luskadoù-se dreist-holl abaoe 1968, **lakaomp**.

O vezañ avat ma n'em eus bet lizher ebet war an divoud-se e klaskin spisaat va menoz-me va unan.

Ar pezh en deus skoet va spered o lenn an danevell-skrid eo "diwriziennadur" ar vaourion e Breizh. Meur a arvez a zo avat d'an diwriziennadur -se. Da skouer, n'o doa ar stourmerion yaouank-se bet harzlammet war hor maeziou liamm na darempred ebet en a-raok gant ar boblañs. N'anavezomp ket o orin kevredigezhel - moarvat ez eo liesseurt - hogen goulakaat a c'hellomp e teuent eus tiegezhioù damwerinel staliet e kêr hag oc'h hiraezhiñ da adskoulmañ gant ar werin (ar pezh a c'hoarvez un tammig gant an emsaverion ende-eeun). Hogen daoust ha gallus eo kaout ul levezon war ur metou hep kemer perzh en e vuhez a-hed ar bloaz ? Gouzout a ran ez eo aet darn eus ar stourmerion boulc'het o studi ganto er Skol-Veur endeo da vicherourion er greantioù hag int mibion vourc'hizion - nevez-vourc'hizion, lakaomp, uhel o rez-bevañ evelkent - hag eus degouezhioù seurt se am eus klevet anv ur wech bennak hogen diouzh a ouzon-me, hini ebet anezho n'eo aet da vevel en ur vereuri bennak betek hiziv. Bet eo krediñ eta ez eo diaesoc'h gwiziennañ e-touez ar gouerion war ar maez eget er greanti e-touez ar vicherourion.

Hogen arvezioù all a zo d'an diwriziennadur. Mar kemeromp degouezh ar PCF e Breizh, da skouer, e verzomp o deus ar re-mañ ur saviad resis ken en amzer ken en egor e Breizh. En em lec'hiañ a reont e kendalc'h istor ar PCF hag ar c'helligoù lec'hel diazezet a bellzo a-wechoù hag a vir ivez eñvor an deraouerion anezho (istor ar c'helligoù-se a vez mesket meur a dro gant darvoudoù o tennañ da amzer ar "Resistañs" a reas d'ar PCF ober ul lamm-gresk souezhus en hor bro (1).

Netra heñvel avat e degouezh ar stourmerion-mañ kouezhet eus an neñv d'ur mintin kaer a viz Eost hag a zo dinijet d'an neñv endro un nebeut sizhunvezhioù war-lerc'h. Hep framm padus - a-hed rummadoù - war an dachenn ne c'hell emsav ebet embreger levezon start ebet war ur gevredigezh. Ur framm avat a vez gwiziennet. Hogen en em ziskouez a ra an diwriziennadur en un doare anatoc'h c'hoazh er mojennoù a hent empenn ar vaourion. Perak, da skouer, ez eo aet ar vaourion war ar maez ? Aes eo gouzout.

(1) Moarvat en deus an emsav gwiziennoù kozhoc'h un tamm mat eget ar PCF e Breizh hogen abafted pe ziegi ar stourmerion o laka da zisteurel da bep rummad kevala ar rummad kent ; se zo gwir da sjouer, eus an UDB savet e 1964.

Evit gounit ar gouerion d'eo menozioù an hini eo. Hogen perak gounit ar gouerion e Breizh (pe e Bro-C'hall rak ne gav ket din, goude holl, o deus ar vaourion dizoloet Breizh evit c'hoazh) ? Ken splann all eo an abeg : peogwir en deus trec'het Mao oc'h en em harpañ war ar gouerion ; dre se, dre ma ne c'hell ket Hon Tad Santel Mao faziañ e nep doare ez eo ret treuzdougen da Europa ar C'hornog pellañ an hentenoù an hentenoù politikel o deus graet berzh er Reter pellañ. Gwir eo, eme egile, ez eo Breizh ur vro isdiorreet. Diskouezet hon eus avat ne c'helle ket isdiorreadur Breizh - a zo enklozet en ur rannved dreistdiorreet - bezañ keñveriet ouzh hini an Trede Bed. Met, n'eus forzh penaos, nag Europa ar C'hornog dre vras dre maz eo diorreet na Breizh dre maz eo 200 gwech bihanoc'h eget Sina ne c'hellont bezañ lakaet e skoaz da Sina. En o skrid avat e veneg ar vaourion an "hirgerzhadeg" a brientas an trec'h a-c'houdevezh evel ma veneg ar Yuzevion an "ermæziadeg" o c'hasas da zouar ar Bromesa. Hogen peseurt hirgerzhadeg a zo gallus en ur vro 300 kilometrad hed war 250 kilometrad led ? Moarvat e trec'ho an Emsav e Breizh hogen gant doareoù-ober hag en un degouezh ha n'en devoa netra da welout gant re Sina. Emgav istorel hor bro a zo diseurt a-grenn hogen ma vefe kentel da glask evit an Emsav e vefe kavet houmañ aesoc'h en Iwerzhon eget e nep bro all, a soñj deomp. Evit gellout trec'hiñ e ranker, da gentañ, gwelout an traoù evel m'emaint war hon tro ha se n'eo gallus nemet o wriziennañ war an dachenn.

Ne fell ket din evit se, eveljust, ober fae war arnod ar vaourion. Egiz m'hon eus merket, fellet en deus dezho adskoulmañ gant ar boblañs, ar pezh n'o deus ket klasket an Emsaverion a-zevri betek henn. N'eus mar ebet koulskoude ne c'hell an Emsav trec'hiñ nemet en deiz m'en devo astennet war ar vro ur rouedad kreizennoù lec'hel padus a c'hell treuzfurmiñ ar gevredigezh vreizhat tamm ha tamm. Hogen arbat e vefe krediñ ez eo a-walc'h kemer stok ouzh ar boblañs war-eeun ; peurvuiañ e rankimp tremen dre aozadurioù a zo bet savet dija hag a zo renet e Breizh betek henn gant Brezhoned gallekaet mui pe vui. Hag amañ, peogwir, emeon ganti, e karfen lavarout un nebeut gerioù diwar-benn an emzalc'h a zo da gaout e-keñver ar c'hweluniadoù kouerion e Breizh. Kavout a ra deomp ne c'hell ket an Emsav en em harpañ war n'eus forzh peseurt c'hweluniad ; ret eo d'an emsaverion klask kenkizañ ar re a chom distag a-walc'h diouzh ar galloud gall pe ar strolladoù gall re greñv. Anat eo, da skouer, n'eus ket nemeur a chañs da gemm ali paotred ar CGT e Breizh rak houmañ a sent bepred ouzh urzhioù ar PCF. Furoc'h eo eta treiñ war-du c'hweluniadoù evel ar CDJA pe ar CFTD pe c'hweluniadoù all peogwir n'emaint ket e dalc'h strollad politikel a-bouez ebet pe c'hoazh peogwir e chomont dishual. An amkan avat a chomo bepred an hevelep hini : o kemer perzh e labour ar c'hweluniadoù o broudañ da sevel c'hweluniadoù dishual brezhon a-benn ar fin ha da zont tre evel-se en Emsav.

Dre vras a-hend-all ez eo arabat en em douellañ diwar-benn talvoudegezh an darempredoù o unan. An dalc'h eo gouzout

gant piv e vo kemeret ar galloud hag an divizadurioù politikel en diwezh : gant an Emsav e unan pe gant e warezourion ?

Aes a-walc'h eo lakat an Emsav da vezañ gwelet mat gant strolladoù zo eus an tu-kleiz ha gounit o "bonnes grâces" (sed pezh a ra an UDB gant ar PCF, da skouer) hogen seurt darempredoù mat a vez gounezet bepred diwar goust mennadoù an Emsav a zeu da goll e ster penn-da-benn a-benn ar fin. Ar pal nemetañ a c'hell kaout an Emsav avat n'eo ket bezañ gwelet mat hogen krouiñ e unan un nerzh politikel padus a c'hell un deiz - ken pell bennak e ve hemañ - sammañ ar veliezh politikel er vro-mañ.

Kement a lavaran amañ a zo gwir diwar-benn n'eus forzh peseurt luskad. Da betra e servijo d'ar vaourion bezañ bet gwelet mat e-pad un nebeut sizhunvezhioù e mereurioù hor bro ma ne grouont framm padus da zerc'hel an dachenn ; da betra e servij d'ul lu trec'hiñ ma ne zalc'h ket ar vro goude-se ?

Ar gwiriadur-mañ hon degas adarre da stigmañ adarre kudenn ar Framm. Aner eo krediñ e c'heller kemm ur gevredigezh gant youl-vat ha mennadoù-mat hepken embannet gant stourmerion faltaziek prest da ziflipout antronoz war an disterañ digarez, o tilezel an amaezh a zo bet fiziet enno evit kemer unan all pe **zoken** o tilezel penn-da-benn al labour evit ar vro. Den n'eo rediet da zont d'an Emsav ha da labourat ennañ ; hogen ar re a ra o soñj chom ennañ a gompren pebezh pouez en deus o labour hag a car ne vo ket tu d'e gas da benn hep pourchas da Vreizhiz ar Framm d'en em harpañ warnañ. A-hend-all e c'hoarvezo gant an Trede Emsav ar pezh a zo c'hoarvezet gant ar c'hentañ hag an eil Emsav : c'hwitañ ha steuziañ en ur varn Breizh d'ar marv.

Evit pezh a sell ouzh degouezh ar gouerion e Breizh, anzav a raimp dichipot ez eo o lec'h ledanoc'h er gevredigezh evit c'hoazh eget e Bro-C'hall, lakaomp. Koulskoude e vefe arabat magañ re a huñvreoù en o ser. Darn a vefe techet a-walc'h da grediñ e c'heller en em skorañ war gendereoù zo eus ar renkad-se evit kas da vat un dispac'h sokialour ha broadel e Breizh ; an huñvre-se a zo unan gozh en Emsav zoken. Koulskoude ez eo ret mat chom dibikouz hon daoulagad ha klask gwelout sklaer ar muiañ maz eus tu. Ar gennad eus renkad ar gouerion a zo barnet dezhañ steuziañ n'eo ket ledan a-walc'h evit kas da benn un dispac'h e Breizh goude ma vefe urzhiet en un nerzh politikel bennak. Ar gennad-se a c'hell pourchas soudarded politikel hogen ne gaso ket renkad ar gouerion penn-da-benn war e lerc'h. Moarvat a-hend-all ez embann stourmerion zo eus ar CDJA ez int a-du gant ur c'hengladekadur bennak hogen n'eo deus menoz na mennad start ebet war ar poent-se. Erfin, dre o modernouriezh ez int prest da zegemer steuziadur ar renkad kouerion evel renkad en amzer-da-zont.

Moarvat ez eus tu da vroudañ un darn vat eus ar gouerion - evel pennoù embregerezh end-eeun, egiz an artizaned pe ar genwerzhourion vihan flastret ivez dindan an tailhoù pe an amprestoù - da stourm war dachenn Vreizh e sell da amkanioù zo. Sed pezh a c'hoarvez dres er mare-mañ gant al luskad ledemsavel ADSAV a zo deuet a-benn da zedennañ izili eus al luskadoù armerzhel politikel CDJA ha CINUDATI eus Kernev-Leon (d'ar sul 21 a viz Du e raint ur vodadeg a-gevret e Pondivi, da skouer)

hogen disoc'h ur seurt argerzh - a chom e par ar c'horzherezh - ne c'hell bezañ nemet un emskiantekadur elfennel ha bresk ha na ziboufo drezañ e unan war frammadur ebet a chom e kembeli an Emsav e unan.

Klaskomp dastum evit klozañ. Moarvat e rank an Emsav evit diraez e baliou skoulmañ darempred gant ar boblañs ; hogen, war ur bazenn gentañ, ne vo ket an darempred-se skoulmet war-eeun hogen dre hanterouriezh al luskadoù ledemsavel (dre luskad ez intentomp ur gronnad stourmerion diframm a zo a-walc'h dezho ober bruderezh). An Emsav avat a rank tennañ e vad eus al labour emskiantekaat sevenet gant al ledemsav evit kinnig d'ar boblañs ar Framm e santo an ezhomm anezhañ. Evit gellout c'hoari a roll-se avat e rank an Emsav :

1) nac'hañ e unan c'hoari roll al ledemsav, da l. eo, nac'hañ chom enket e par ar bruderezh hag an darempredoù nemetken ; se zo sklaer a-walc'h ;

2) an em aozañ e unan evel ur Framm mennet da bourchas d'ar boblañs emskiantekaat ar gwazerezhioù broadel a zereo outi, da gentañ, avat, war dachenn ar c'helennerzh.

Un nebeut evezhiadennoù a rin bremañ e sigur troidigezh ar pennad kembraek hon eus embannet e niverenn diwezhañ **IMBOURC'H**. Kel a oa enni eus ar gevredigezh kembraek da sevel a-ziforc'h diouzh ar gevredigezh saoz. Dre vras e c'heller tuiñ d'ar pezh a zo displeget ebarzh ar pennad-se. Koulskoude hon eus kavet strizh ha diresis war un dro keal ar gevredigezh kembraek empennet gant aozer ar pennad. N'eus ket tu, d'hor soñj, da stagañ dazont gevredigezh kembraek ouzh ur bloc'h kembraeger bennak ; e Breizh kennebeut a-hend-all rak ar pezh a chom eus ar bloc'h-se a zo o vruzhunañ. bemdez ha n'eus forzh peseurt "kendrev" c'hounezel - keal ar gendrev a zo bet empennet war-dro ar bloavezhioù '60 e Breizh - a vo beuzet hep dale en ur metou galleg. A-hend-all, krediñ e c'hellfe ur gevredigezh vroadel bevañ er c'houmoul hep labourat e sell d'ar Stad vroadel pe en he c'hreiz a zo ur fazi hep mar ebet ; anez kaout un aozadur politikel a-du ganti ne c'hellfe kevredigezh vroadel ebet padout gwall bell. Ar gwellañ e vo tu d'ober e vo krouiñ ur geto ouzhpenn e-kreiz ar gevredigezh estren trec'h dezhi. Se a zle bezañ komprenet mat gant ar stourmerion vrezhon.

H.K.

SKOL AN EMSAV

Bodadeg-veur SKOL AN EMSAV a zo bet dalc'het d'an 11 a viz Du 1974 e Gwengamp e sez ar C'helc'h sevenadurel brezhon. En niverennoù da zont e roimp un danevellskrid eus ar vodadeg-veur-se. Addisplegoù a vo graet en he ser war un dro.

WAR - DU AR BLOAVEZH DAOU - VIL

Keleier liesseurt evit reiñ da gompren
petra eo ar bed a-vremañ ha petra e vo ar bed da-zont.

=====

MALTUZEGEZH

Bez ez eus o vont war-raok hiziv er Stadoù-Unanet ul
luskad renet gant Milton Eisenhower, breur al levier, a- enep d'an
tiegezhioù niverus met a-du evit paouez gant kreskidigezh ar
boblañs-bed. Peget e vez er mare-mañ skritelloù a-vil-vern dre
ar riez gant an destenn-mañ :

THE TWO-CHILD FAMILY MEANS SURVIVAL IN THE '70'S
STOP AT TWO

(An tiegezh daou vugel ennañ a dalv treuzvevañ er
bloavezhioù 70. Paouezit goude daou)

Gwazhwelourion eo an nevez-virourion-se, evito da vezañ
spontet gant an dreistpoblatur, saotradur ar metou, tasmant an
dilabour, spez ar brezel derc'hanel ha diaesterioù ar vuhez arnevez
er c'hêrioù bras. En anv an Natur a vennont difenn e fell dezho
mirout ur c'hempouez etre mab-den hag ar rummoù plant ha loened a
vev war-c'horre an douar.

Kontrol e kement-se d'an hengoun yuzev ha kristen en
deus roet bepred ar renk kentañ er grouadelezh da vab-den ; kontrol
eo ivez da gelennadurezh ar sokialourion a ra eus mab-den an dra
pouezusañ en hollved ; hervez Marks ez eo ret da vab-den "denelaat"
dremm an douar. Iskis eo gwelout pegen kilstourmer e teu da vezañ riezoù
ar c'hornog ha pegen bihan eo o fiziañs e barregezhioù mab-den evit
diorren ar skiant ha mestroniañ an dazont.

MEURVORIOU DIVUHEZ

Diskleriet en deus ar C'habiten Jacques-Yves Cousteau
- tremenet gantañ tregont vloavezh eus e vuhez oc'h imbourc'hiñ ar
morioù - e c'hellfe mont da get ar vuhez vorel da vat a-benn hanter-kant
vloaz. Kement-se en deus diskleriet dirak ur poellgor eus ar Sened
Norzhamerikat, ma oa bet pedet da zont dirazañ evel un arbennigour
brudet dre ar bed a-bezh. Gouelec'hioù eo deuet da vezañ kondonioù zo
a oa naet ha leun a vuhez ugent vloaz zo.

A-viskoazh o deus kredet an dud ne c'hellfe morse mab-den
ober an disterañ tra a-enep d'an nerzh ramzel-se. Gouzout a reer
hiziv avat emañ o tiskar ar meurvor gant ar saotradur hag oberoù
all. Hervez an ao. Cousteau ez eo ret groñs bodañ an abretañ ar
gwellañ ur c'hendalc'h etrevroadel gant an holl riezoù greantel
evit difenn ar meurvorioù ha paouez a fennañ enno dilerc'hioù ar
greanterezh (milionoù a donennoù bep bloaz) a dag hag a zistruj
kement buhez vorel zo.

EMBREGEREZHIOU A-ENEP D'AR RIEZOU

Degaset e vez alies ar rezid armerzhel en hon touez evel
an diviz kentañ ret evit diorren ar broioù paour evel hon hini. Ur
c'heal arlakadel ez eo rak n'eus riez ebet a vefe dieub diouzh riezpa

all er bed a vremañ, ken stag m'eo an armerzhioù arnevez
kennetrezo. Daoust da se ez eus disheñvellderioù bras etre ar
riezoù. E dalc'h an danvezioù kraï o tont eus an Trede Bed e-
mañ, da skouer, riezoù Norzhamerika ha Kornogeuropa tra m'
emañ riezoù an Trede Bed e dalc'h an aveadurioù greantel, ar
c'halvezerezh hag ar c'hevalaoù o tont eus ar riezoù diorreet
hogen anat eo ez eo kalz diaesoc'h emgav ar riezoù paour-mañ
eged hini ar re all. Pezh a zo chalus dreist-holl evit reizif
ar riezoù eo an emdroadur hon eus meneget dija ebarzh IMBOURC'H
(Niverenn 17, pajenn 134-135) a gas embregerezhioù kevalael
da embreger ul levezon brasoc'h-brasañ er bed a hiziv.

Dudius eo teurel ur sell ouzh an davevellskrid
embannet nevez zo er Stadoù-Unanet, ennañ disoc'hoù un enklask
kaset da benn gant ar C'hendalc'h norzhamerika diwar-benn
kengreadur an embregerezhioù brasañ e 1970. Mont a ra alies
ar c'hengreadurioù-se, dreist da Gendero'h Broadel Kriz-riezoù
bras a-walc'h evel ar riezoù latinamerikat (daoust ma voe 1970
ur bloavezh fall evit ar graoù er bed kevalael).

Eus 23 riez latinamerikat ne voe nemet teir anezho
(Brazil, Mec'hiko hag Arc'hantina) evit kaout ur C'h.K.B.K. brasoc'h
eged kengreadur General Motors? American telephone hand Telegraph,
Standard Oil of New-Jersey ha Ford Motors...

Fall kenañ e voe ar bloavezh 1970 evit GENERAL MOTORS
en abeg d'an enkadenn armerzhel er Stadoù Unanet met daoust da se
ez eo savet gwerzhioù G.M. da 18 800 milionoù a zollarioù, da
lavarout eo 8.700 milion muioc'h a zollarioù eget K.B.K. Venezuela.
(10 100 milion), ur riez a zo enni 11 milion a annezidi ha korvoder
uhelañ Latinamerika. K.B.K. Venezuela a zo an 29vet er bed met bez ez
eus 4 c'hevredigezh morzhamerikat hag unan europat evit mont dreist
dezhañ.

Kalz brasoc'h eo kengreadur Sears Roebuck (dezhañ adkev-
redigezhioù niverus ha bleunius e Latinamerika) gant 9.300 milion a
zollarioù eget K.B.K. Kolombia (6.600 milion), 39vet K.B.K. ar bed
ez a dreist dezhañ 11 kevredigezh kevalaour. N'eo ket Breizh ur riez
hogen gallout a reer priziañ he c'h.K.B.K. war-dro 4.000 pe 5.000
milion a zollarioù, elese nebeutoc'h eget Chile ez a dreist dezhañ
12 kevredigezh dre ar bed (K.B.K. Chile a zo 6.300 miliona zollarioù).

E-touez ar 51 galloud armerzhel brasañ eus ar bed a hiziv
ez eus eta 38 riez ha 13 kevredigezh liesriezel. Gwall nec'hus eo
soñjal e vez kemeret disentezioù a bouez bras evit kantmilionoù a dud
gant poellgorioù bihan ha na vezont reolet gant dael ebet. ont a ra
a-benn un embregerezh hepken e unan da zaspuga kementadoù brasoc'h
eged a ra ar strivadoù kaset da benn gant millionoù a annezidi en
ur vro, ha kement-se evit brasañ mad un niver bihan a gevraneion.

Pell a vezañ a-du gant an araokaat er riezoù e-lec'h
m'emaint e c'hoari alies an embregerezhioù ur roll drastus ha n'eo
ket hepken war an dachennarmerzhel. Distummañ a reont spered an dud
gant o bruderezh hag o zarañverezh a glask atizañ ezhommoù faoz ha
bleniañ ar bevezerezh war hentoù zo, enebet alies ouzh ezhommoù gwirion
ar boblañs. E-lec'h stummañ keodedourion atebek hag emskiantek
(pezh n'eo ket o fal eveljust) e reont eus an dud margodennoù
arallekaet n'o deus koustiañs kevredigezhel ebet ken.

Arvarus int ouzhpenn war an dachenn bolitikel evel m'eo
bet anat alies en tremened, da skouer er Gwatemala pa voe diskaret
gouarnamant araogel ar C'honorol Arbenz gant gopr-soudarded an
United Fruit er bloavezhioù 50. Ur galloud ramzel ha direol

A - D R E U Z L E N N

"Le grand traité franco-breton" gant Michel de Mauny.

1532. Ar feur-emglev unaniñ. Kentoc'h eget en "Anschluss" e laka da soñjal e gwalldaol Praha 1968, rak an "Anschluss" a voe deuet mat d'ar pep brasañ eus pobl Aostria. En eneb e voe desammet ar feur-emglev unaniñ war bobl Vreizh, daoust d'he youl, dre dreisoni, touell, tarverezh ha gwallnerzh.

An holl feurioù a stag tamm ha tamm ar Stad vrezhon ouzh Bro-C'hall, a seiz a nebeudoù ar c'horf brezhon a c'hoarvez penn-da-benn eus skrokerezhioù, eus trubarderezhioù, harpet war ar feulster hag ar muntr bewech ma tiskoueze kement-se bezañ ret holl da dizhout ar pal merket.

Pezh a zo mat en oberenn Michel de Mauny eo en deus lakaet anat penaos eo aet war-raok gwikefre ar sujedigezh da Vro-C'hall ha pegen heugus e oa ar sujedigezh-se. N'eus ket anv amañ eus ur romant karantez, - eus gwallerezh, ne lavarant ket. Ha n'eus ket tu da zizarbenn an diskouezadur-se dre m'eo skoret war zihelloù embannet en o hed. Seurt aked, moarvat, ne gaver ket ebarzh levrioù istor savet gant mevelion Vro-C'hall a fellfe dezho skrivañ istor Breizh en ur lemel diouti kement a c'hellfe displijout d'o mistri.

Evit stourmerion an Emsav ez eo al levr-mañ ur benveg stourm efedus meurbet a c'hellint kaout dindan o dorn en o levraoueg.

Petra a dalvez evit ar C'hallaoued a hiziv ar "chiffon de papier" eus 1532 ? Moarvat ne dalvez ket muioc'h eget ar "chiffons de papier" diniver o deus sinet a-hed o istor. Ur ger roet ha kemeret endro. An istor n'eo graet nemet eus kement-se.

Evidomp-ni Breizhiz, ar feur-emglev-mañ a rankjomp sinañ dre heg, en desped d'ar reizhded ha da wir ar pobloù ne voe biskoazh nemet un disterañ droug a oa gwell hepken eget an netraidigezh klok. Hogen daoust ha bez e c'hell pourchas un danvez breutaat hiziv gant ar Stad c'hall ? Hogen daoust hag ar Stad c'hall a zo c'hoazh un emzivizer talvoudek d'ar mare m'emeur o prientiñ unded ar c'hevandir-mañ ha ma hañval ar STADOU-BROADOU bezañ tonket da zizeriañ ?

KERVORC'H

WAR-DU AR BLOAVEZH DAOU-VIL (Kendalc'h ar bajenn)

a zo gant seurt kevredigezhioù hag a laka en arvar beliezh ha reizid ar riezoù, zoken ar re vrasañ rak ne ra o fouez hag o levezon nemet kreskiñ er bed kornogel. Dont a ra an embregerezhioù liesriezel-se e gwirionez da vezañ mui-ouzh-mui embregerezhioù "enepriezel".

JAKEZ AR BIHAN

=====

BODAD EG - VLOAZ AR C'HEVRE KELTIEK

Dalc'het e voe hevbene e Glasc'ho e-pad dibenn -sizhun kentañ miz Here. An darn vrasañ eus ar 25 pe 30 den a gemeras perzh a oa Skosiz anezho. Bez e oa dileuridi eus skourroù Iwerzhon, Kembre, Kernev-Veur koulz hag eus skourr etrevroadel Lunden.

Er bodad kentañ e komzas pep dileuriad eus emzalc'h ar bobl en e vro e-kêñver arc'hadurioù ar vroadelourion. Diskleriet e voe ivez peseurt degemer a vez bremañ d'ar c'hinnigoù kenober gant ar Gelted all. D'ar sadorn e voe danevellet gant sekretourion ar skourroù broadel hag ar sekretour-kreiz e pe bar emaint e-keñver ezeladurioù hag arc'hant ha peseurt obererezh a zo bet kaset da benn ganto e-doug ar bloaz tremenet. Berr-ha-berr: skoazellet eo bet Euskariz (da vare prosez Burgos) gant pemp eus ar skourroù (displegadegoù straed, lizheroù da bennadurezhioù, diskleriadurioù d'ar c'helaouennoù ha dre skingomz, diskleriet eo bet ganeomp ur c'hevbene keltiek e-keñver kudennoù armerzhel (gounid diwar an eztennañ kailh-metal da dalvout evit mad ar bobl a-bezh), kevredigezhel (skingomz evit ar Gouzelva), deskadurezhel (derc'hel digor skolioù iwerzhoneg ha kembraeg war ar maez), politikel (kenvarc'had diemsavus d'ar broioù keltiek, sev naturel (ledanaat lec'h ar yezhoù keltiek er vuhez foran). Embannet hon eus levr-bloaz ar c'hevren e koulz ha CELTIC NEWS peuzreoliek, startaet eo bet an darempredoù etre Kelted divroet ha luskadoù broadel o bro c'henidik. Lakaet ez eus bet estrenion da anaout gwelloc'h arc'hadurioù ha stourmoù ar Gelted.

Kemer a reas ar gendalc'hidi perzh e kentañ bodadeg vloaz COMUNN NA NCANAIN ALBANNAICH, ur gevredigezh savet evit gounit anaoudegezh a-berzh-stad d'ar skoseg (evito ez eo sklaer e tle ar gouzeleg bezañ yezh vroadel ALBA). Mennet eo he renerion da ober diouz skouer CYMDEITHAS YR IAI-TH CYMRAEG. Evezhiañ a reas Breizhiz hag Iwerzhoniz e vije fur dezho sevel o c'henreizhad deskadurezh int o unan ha strivañ da grouiñ o c'hevredigezh skosegerion int o unan : a-hend-all e c'hellfe anaoudegezh a-berzh-stad ober muioc'h a zroug eget a vad. Se a weler en Iwerzhon. Evit ar C'hevren keltiek, an divyezhegezh n'hellfe bezañ ur stad da badout.

D'ar sul e voe adsellet ouzh bonreizh (pe kenteizhadur) ar C'hevren. Dalc'het e voe d'ar palioù meneget ha spisaet warlene e Kernev-Veur, ha degemeret da stagadenn e tleo founnerioù-natur pep bro geltiek dicub bout korvoet evit mad an holl dud er vro. Ar menoz-se a vo da spisaat. Divizet e voe diouëriñ bez-sturierion a ziwar vremañ, hag ar garg a sturier a vo hepken unan a enor hiviziken. Kemeret e vo divizoù gant ar C'huzul-kreiz, anezhañ ar bennefrididi (sekretourion ha pennskrivagnerion), ha daou zileuriad eus pep poellgor-skourr. Dilennet e vo ur poellgor e pep skourr.

Goulennet e voe digant kuzul ar C'hevren a-berzh skourr Breizh emdiskleriañ a-du gant skourr Iwerzhon a fell dezhañ krouiñ ur c'hef evit harpañ soudarded skoaat ha kembreat e Norzh-Iwerzhon hag a garfe "kuitaat o c'hompagnunezhioù". Unan eus an dileuridi a enebas ouzh ar mennad-se hag unan all a chomas hep votiñ. Ar re all a oa a-du. Goulennataet e voemp pizh goude-se a-zivout ar mennad-se gant ur "c'hendalc'h kelaouennerion".

Divizet e voe e tlefe pep skourr ober gant ar yezh vroddel ar muiañ ma c'hallint en o c'henskriv rezh ha bodadegoù. Nac'het e voe ur mennad o c'houlenn na vefe degemeret er C'hevre nemet izili desket ganto unan da vihanañ eus ar yezhoù keltiek.

Kaset e voe ul lizher da boellgor micherourion UPPER CLYDE SHIPBUILDERS o reiñ dezho da c'houzout e oa ar C'hevre a-du gant o diviz kemer an emell eus o labouradeg sevel-listri.

Ur skol-hañv etrekeltiek a vo aozet en Iwerzhon e 1972, dezhi ar pal deskiñ d'ar berzhidi ar muiañ iwerzhoneg ma vo gallet ha ren kendaeloù a-zivout kudennoù boutin d'ar broioù keltiek. D'ar re a zo dedennet skrivañ pebare a zerefe ar gwellañ outo. Ar goust a vefe war-dro ugent lur gall an devezh. Divizet e voe ivez, diwar c'houlenn daou zileuriad hag a gav abeg en implij a vez graet eus ar saozneg en hon embannadurioù, ober un enklask e skourr Breizh. Ha c'hoant o defe e izili da gaout ur pennad pe zaou el levr-bloaz e galleg, evit ar re a garfe emezelañ er C'hevre ha na c'hellont ket lenn brezhoneg ? Ar respontoù a vo da gas d'ar sekretour, J. Derouet. Hervez an daou zileuriad-se e rofemp kred d'ar saozneg evel yezh etrekeltiek en ur ober gantañ. Hervez darn all e vefe gwelloc'h ledanaat tachenn ar brezhoneg ha goulenn ouzh Breizhiz deskiñ brezhoneg a-raok emezelañ ; neuze, ober muioc'h gant ar brezhoneg e levr-bloaz ar C'hevre hag er CELTIC NEWS. Kudenn ar genyezh a c'hellfe bout diskoulmet dre ur genreizhiad skolioù ha troidigezhioù. Goulennet e voe ha tu a vefe da liesskrivañ un embannad eus CELTIC NEWS e brezhoneg. Ar gudenn a zo : piv a sammo al labour-se ? Harpit bepred ar C'hevre keltiek. Prenit allevr-bloaz. Emezlit o skrivañ da sekretour skourr Breizh : J. DEROUET, 1 rue G. ANDRE, 44-NANTES.

A.H.

LEVR-BLOAZ AR C'HEVRE KELTIEK

Setu dek vloaz abaoe ma voe savet ar C'hevre keltiek. E miz Eost ez eo bet embannet gantañ e eizhvet levr-bloaz, dindan an titl : "CELTIC UNITY ... TEN YEARS ON". 164 pajenn a zo ennañ, ha 45 pennad. E-touez o aozerion e kaver Gwynfor Evans, rener PLAID CYMRU, ar c'heleannour Jac WILLIAMS ; stourmerion daer evel Séamus O tuathail hag Eoin O Murchù ; ar skrivagnerion Diarmaid O Suilleabhàin Bobi Jones, Donall Mac Amhlaigh, Emyr Humphreys ; ar varzhed M. O Direain, Caitlin Maude, Pearse Hutchinson, Anjela Duval ; rener Gael Linn h.a. Gouestlet ez eus un darn vat eus ar pennadoù da gudennoù yezh : "The irish speaking communities in Ireland" - "The problem of language revival" - "Why I write in welsh" - "Linguistic imperialism or linguistic equality" - "National aims need unified effort".

En e bennad e tiskleir O Suilleabhean da Gelted ar broioù all penaos ez eo bet trubardet Iwerzhon abaoe hanter-kant vloaz. Pennadoù all a zo anezho arnodoù da reiñ plas d'ar yezhoù keltiek el levr-bloaz hep koll d'an darn-vrasañ eus al lennerion. Mat e vefe gouzout petra a soñj ar re-mañ eus divyezhegezh ar pennad

"Ni ? I an ghaeilge ach ! (pik-estlamm) mor amhain ? " "Daoust hag ar gouezeleg n'eo nemet ur pik-estlamm ? " mennet evit nann-Iwerzhoniz ; eus al lakaat keñver-ha-keñver barzhonegoù e yezhoù keltiek hag o zroidigezhioù e brezhoneg pe e saozneg ; eus aozidigezh ar pennad manavek en un doare-skrivañ heñvel ouzh hini ar gouezelegoù all ; eus talvoudegezh ur pennad evel hini L. Mac Mathuna evit diskouez keñtentiezh ar yezhoù keltiek.

Moarvat ez eus un tamm digempouez etre ar pennadoù-se hag ar re all gouestlet d'an neuizioù politikel ha kevredigezhel eus hor c'hudennoù. Arabat krediñ koulskoude ez eo tizhet ar C'hevrek keltiek gant ar "gwariadur yezhelour". Fellout a ra deomp e vefe eus pobloù ar broioù keltiek kumuniezhoù dibar, o tiorren ur sevenadur dibar ; krediñ a reomp avat ez eus muioc'h da ober evit diogelaat kement-se eget sevel stadoù emren : endalc'had kevredigezhel ar stadoù-se eo a gont dreist-holl. Ret eo kevreañ ar strivad sevenadurel gant ur strivad da wellaat doare-bevañ ar pobloù keltiek. Laouen e vimp o kaout adalek bremañ pennadoù digant kenskriverion hag o deus menozioù sklaer a-zivout ar c'hevreadur-se.

"CETIC UNITY -- TEN YEARS ON" a zo bet kaset a-benn bremañ d'an holl dud hag o deus paeet o skodenn-ezel pe o c'houmanant evit 1971. Bez e c'heller e bremañ digant JAKEZ DEROUET, 1 rue Géo ANDRE, 44 - NANTES, CCP : J. DEROUET, 3264-47 NANTES - Priz 13 Lur).

=====

DISLAVAR OU AN EMSAV

Eil pennad :

Dislavar ar yezh
hag ar sevenadur

-!-!-!-!-!-!

Bez ez eus bet ur mare en istor an Emsav ma oa ar yezh un tu da dostaat ouzh ar bobl, da vihanañ e kornog ar vro. D'ar c'houlz-se e oa an emsaverion, gant o galleg - bourc'hizion a oa anezho, ho pezet soñj - distaget diouzh ar werin hag o teskiñ ar brezhoneg e klaskent "adpiaouañ" ur stuzegezh a oa sellet - dre fazi moarvat - evel ur grouidigezh emskiantek eus ar gevredigezh vrezhon pa ne oa e gwirionez nemet aspadenn ur sevenadur maezel o tizeriañ. Bezet pe vezet, pezh a c'hoarveze eta eo e klaske an emsaverion a neuze - hag int a orin bourc'hiz, egiz ma verkemp, pe nevez savet d'ar vourc'hiziezh - gallekaet hag estrenekaet ouzh o fobl en em deuziñ endro en ur gevredigezh werinel a hañvale bezañ gouest da badout da viken.

Moarvat e oa an emzalc'h-se frouezh un emdouell evit darn. Ne vije ket deuet war spered an emsaverion-se o dije gullet kerkoulz all kemer perzh er stuzegezh plouezet a estlamment outi dre wiskañ chupennoù glazik pe votoù-prenn (e devoud, sed evelato pezh a soñje darn eus an emsaverion gentañ, Taldir pergen). A-benn ar fin e felle d'an emsaverion - araogelour zoken evel Emil Masson - en em goll er werin kentoc'h eget hec'h harpañ da grouiñ ur sevenadur nevez a vije bet barrek da herzel ouzh ar sevenadur a oa bet sammet war bobl Vreizh gant ar Stad c'hall a lede war ar vro roued he mererezh hag hec'h ensavadurioù.

Adal an Emsav kentañ eta e oa dija un dislavar yezhel en Emsav peogwir e teske an Emsaverion ur yezh he devoa paouezet abaoe pell a c'hoari er vro ar roll broadel a aparchante outi ; ne oa ket mui ar brezhoneg abaoe meur a gantved ur benveg krouiñ sevenadur.

A c'houde ar mare-se avat ez eo bet paket an Emsaverion en un dislavar nevez, ginduet d'an hini emamp o paouez deskrivañ.

Maz eo gwir ne c'helle ket an Emsaverion kas da benn o c'hefridi o teskiñ yezh ar werin e deroù ar c'hantved-mañ, da skouer, da vihanañ e c'hellent chom a-stok outi hag e darempred ganti dre ar yezh ha spiañ a c'hellent eta kaout un tamm levezon warni a-benn ar fin. Hiziv avat, er c'hontrol, en deus an Emsaver en em droc'het a-grenn diouzh ar werin c'hallekaet dre ar brezhoneg end-eeun. Goude ma vefe gouest c'hoazh an den eus ar bobl da zrailhañ un tamm brezhoneg ne oar ket hemañ ar yezh-se mat a-walc'h evit ren enni buhez spered ebet. War ar marc'had, muioc'h mui a Vreizhiz a zo o vevañ bremañ er c'hêrioù gallekaet a bell zo; ha na disoñjomp ket ar Vrezhoneg a vev e reter ar vro a zo bet gallekaet abaoe kantvedoù. Dre ar brezhoneg eta - ha seul vuic'h maz eo diorreet e yezh - en em serr an Emsaver en ur sekteñ vihan barnet da grak-vevañ warni hec'h unan.

=====

Eveljust en deus klasket an Emsaver un ode da zont er-maez eus dislavar ar yezh. Darn o deus kavet an ode-se er galleg end-eeun. Peogwir e komz ar bobl vrezhon galleg a-benn bremañ, komzomp ha skrivomp galleg evelti, emezo. Evel-se en deus ur barzh eus an U.D.B., Pol Keineg, savet e varzhonegoù e galleg, yezh ar bobl ; evel-se ivez, e Kembre - e-lec'h ez eo ar saviad kevredigezhel par a-walc'h da hini Breizh - en deus meur a skrivagner divizet kemer ar saozneg da venveg eztaoliñ e vuhez kefredel, bepred war an hevelep arbenn : ne c'hell ket ar skrivagner en em zigenvezañ diouzh e bobl. Hag e devoud e c'heller en em c'houlenn ha ret eo d'ur bobl kaout ur yezh arbennik evit kadarnaat ha diogeliñ he dibarded vroadel : Kebekiz, da skouer, ne vint ket kemmesket gant ar bobl c'hall war zigarez ma komzont an hevelep yezh hag hi. H.a.

Ret eo lavarout koulskoude e kouezh ar re a erbed e Breizh ur seurt ode d'ar-maez eus dislavar ar yezh en un dislavar all a zo ken gwazh all hag a zo istorel en dro-mañ. Plijet pe get, ne c'hell ket an Emsaverion adkrouiñ an Emsav da bep rummad anez ober eus hemañ un anadenn berrbad tonket da steuziañ ; plijet pe get, an Emsav n'en deus a gevala istorek nemet brezhonek e vefe ; an Emsav n'en deus kevala istorek ebet e galleg. N'hon eus ket e Breizh a lennegezh vroadel e galleg. Ne c'hell an Emsav eta arverañ ar galleg nemet evit ar bruderezh hag an tarañverezh.

Mennout a-daol-trumm kemer ar galleg da venveg krouiñ hor sevenadur - pe lezel ar yezh a-gostez evit ur pennad a-hervez war wel ezhommoù ar stourm dispac'hel, da skouer - a zougfe eta daou arvar marvus. Kement-se a lavarfe, da gentañ, dioueriñ kev-ala istorek an Emsav hag ober eus hemañ un ijinadenn didel, hep gwizzienn ebet en istor. An eil arvar avat a vefe ken argollus all: o vezañ m'emañ ar bobl vrezhon a-stok ouzh ar bobl c'hall hervez an douaroniezh end-eeun ne vefe tamm kemm ebet etre buhez spered ar bobl c'hall hag hini ar bobl vrezhon o vezañ ma implijfent a-hend-all an hevelep yezh. D'ar c'houlz-se ne weler ket mat perak e vefe ezhomm pourchas ensavadurioù diforc'h d'ar Vrezhoned - hemañ eo koulskoude pal an Emsav - adal m'en em gemmeskfent penn-da-benn gant ar C'hallaoued.

Anzav a ranker moarvat ne c'hell ket an Emsav kavout e berr amzer un ode da zislavar ar yezh ha na vefe ket un tec'h a zirak an dislavar e unan. Gwir eo ez eus un disrann etre an Emsav hag ar bobl er mare-mañ ; gwir eo ivez n'en deus an Emsav krog ebet kennebeut er bobl en abeg d'ar yezh end-eeun ; gwir eo a-benn ar fin ez eo an Emsaver un estrañjour e-kreiz e bobl, evel m'en deus merket Roparz Hemon ; ken gwir all eo a-hend-all nec'hell ket ar skrivagner brezhonek abarzh pell livañ ha levezonañ kevredigezh Vreizh egiz m'emañ hiziv ha n'en deus da zanvez e oberenn nemet an Emsav a chom evit ar poent ur gorrevredigezh ha n'eo ket en em ziskouezet en Istor en un doare anat.

Daoust da se e kav deomp e tle an dislavar bezañ degemeret evel m'emañ e-pad ur pennad amzer. War hir dermen hepken e tigor daou hent a gaso er-maez eus an dislavar.

Da gentañ hini al ledemsav. Komprenomp dre ledemsav sammad an nerzhoù a laka da ziwanañ e Breizh un emskiant bobl a rouda Vreizhiz meizañ ez eus anezho ur gumuniezh poblet diforc'h diouzh an hini c'hall hep bezañ gouest evit keloù se da bourchas d'ar bobl ar galloud krouiñ - endalc'het en ensavadurioù pergen - na frouezh ar galloud krouiñ e unan, ar c'hevala istorek a reizh-abegfe ar gwir d'en em vataat diouzh ensavadurioù politikel end-eeun. Kement-se a empleg ez eus derezioù el ledemsav, da gentañ ; ar CELIB hag ar FLB en em gav o daou el ledemsav ; anat eo koulskoude en deus graet an eil kalz muioù evit dihuniñ an emskiant bobl - na c'hell an Emsav tizhout hini ebet eus e balioù hepti - eget

ar CELIB, da skouer. Empennañ a c'heller zoken ur FLB o tizhout sevel ur Stad, evel en Iwerzhon ; diouzh ma ne rafe ar Stad-se nemet kenurzhiañ ur gevredigezh c'hallekaet ha gaonac'h dre se er par brezhon - adskeudenn ar gevredigezh c'hall ne vefe ken eus ar gevredigezh vreizhat-se - e chomfe ar Stad-se end-eeun e rez al ledemsav.

Bremañ avat e verzomp en diwezh diskoulm an dislavar. Ne vo kavet hemañ nemet en deiz ma tegemero al ledemsav aotrouniezh speredel an Emsav. Kement-se zo lavarout ne oufe an Emsav da nep mare en em gemmeskañ gant ar galloud stadel evit abegoù pleustrek o tennañ da gefridi an Emsav e unan hag evit an abegoù a bennaenn emomp o vont da zisplegañ. Ar c'hraf-mañ, a-hend-all, hon eus meret meur a wech.

Pa vo savet ur Stad e Breizh, da l. eo, un aozadur politikel riek oc'h en em vataat eus gwirioù kevatal da stadoù all ar c'hevandir-mañ e vo bet gallekaet Breizhiz penn-da-benn. O vezañ ma vo dic'hallus en ur vroad diorreet - dreist-holl e-keñver deskadurezh - hep harp ur galloud impalaerel estren sammañ war ar bobl, war zigarez hec'h advroadelañ, ur galloud stadel a vo estren outi a-grenn e vo ret mat perzhiekaat ar boblañs egiz ma vo, gallekaet pergen, e mererezh ar Stad-se a vo moarvat gallek a yezh hag a spered. Adal ma vo bet savet avat ar Stad-se - pe n'eus forzh pe aozadur politikel damrez zoken - e loc'hint dre o bezoud end-eeun un argerzh a emskiantekaat broadel a c'houlennno pergen kantreizhadur un aotrouniezh speredel a rankint kavout dre ret en Emsav.

C'hoazh e vo ret avat d'an Emsav chom distag diouzh ar galloud-se ma fell dezhañ seveniñ en e geñver ar gefridi a aotrouniezh speredel a aparchant outañ. Ma vefe enframmet an emsaverion en ur Stad c'hall-brezhon e vefe gallekaet ar re-mañ koulz hag er Stad c'hall hec'h unan ha c'hoarvezout a rafe a-benn ar fin ar pezh a zo c'hoarvezet er grennamzer endeo : a-benn ur pennad amzer e tlefe ar Stad c'hall-brezhon-se, hervez ar reizhpoell istorel, bezañ enframmet er Stad c'hall o kas d'an traon gantañ e unan an Emsav a vije en em gemmesket ganti.

Hogen evit un abeg all a bennaenn, evel ma lavaremp, e tle an Emsav chom dishual e-keñver nep galloud stadel bennak

e vefe. Ne c'hell ket an aotrouniezh speredel c'hoari he roll nemet doujañ a rafe rezid an dud a fell dezhi kelenn hag heñchañ. E-lec'h ez eus redierezh ha destrisherezh danvezel ne c'hell ket bezañ a aotrouniezh speredel.

An devoud-mañ a genstign meur a gudenn a zo ar re-mañ, da skouer : enklenskadur an emsaverion er reizhiadoù riezal a-benn o intrañ hag o zruzfurmañ eus an diabarzh ; seurt argerzh intrañ ha zruzfurmañ a vo rannel tre dre ret e diabarzh ar Stad c'hall ; aes eo kompren perak. Ne vo sevenet da vat nemet e diabarzh ar Stad vrezhon ; ne vern penaos, ne raio berzh nemet ma vez kaset da benn gant urzh a-berzh un Emsav framm start. Ma klask an Emsaverion avat dont tre eus o ferzh-int pe a-hiniennoù e nep aozadur estren e ve e vint lonket ha distrujet gant an aozadur-se. Elese, chom a ra an Emsaver atebek dirak an Emsav e unan bepred e n'eus forzh peseurt aozadur en devo da labourat ennañ evit kont an Emsav.

An eil kudenn a zo houmañ : penaos diogeliñ d'an Emsav ar rezid na c'hell ket heptañ seveniñ e gefridi ? Sklaer eo e ranko ar rezid-se kaout un diazez armerzhel adal ma ne vo ket enframmet er Stad. E gerioù all, penaos e c'hell un aotrouniezh speredel en em glenkañ en ur gevredigezh bennak evit c'hoari enni ar roll a zegouezh dezhi ? Pe c'hoazh, daoust hag ur seurt aotrouniezh a c'hell tremen hep ur galloud armerzhel (1) ma tle ar galloud politikel ? Ne fell ket deomp kinnig un diskoulm d'ar gudenn-mañ, he stignañ hepken, ne lavaromp ket.

An trede kudenn a zo hini unded frammadel an Emsav. Daoust ha ne c'hell bezañ nemet ur framm en Emsav ha penaos e tle unded an Emsav bezañ komprenet ? Seurt kudenn, adarre, a zo aesoc'h da stignañ eget da ziskoulmañ ; hogen ur skouer a c'hell marteze teurel gouloù warni. Degemeret e vo gant an holl n'en deus ket an Emsav da blediñ gant ar gravez ; an dra-se a zo afer an Iliz (pe an Ilizoù e Breizh) ; aotren a ranko pep unan avat d'ar veleion ha d'ar gristenion ar gwir d'en em glevout kenetrezo evit sevel un doare framm relijiel a vasto da ezhomm an emsaverion gristen. Gwelout a reer diouzhtu ne c'hellfe an "Iliz vrezhon"-se bezañ stag ent furlmel ha dezvel ouzh ar peurrest eus ar gevredigezh emsavel

(1) Notomp ez eo ar galloud kevalael a vremañ ur galloud stadel. Ar galloud armerzhel ez eus anv anezhañ n'en deus netra da welout gant ar galloud kevalael.

- dre se ivez ez eo santet an Emsav evel ur c'horf estren gant ur bobl a zo klenket en he fezh en ur framm arallvroat. Un dislavar a zo eta etre Breizh kempred hag an Emsav.

- An dislavar-se ne c'hell ket bezañ lamet war-eeun, evel maz eo techet darn da grediñ, pergen dre blantañ poblañs Vreizh da heul ur reveulzi bennak en ur Stad reolet penn-da-benn hag ent dihanterat gant an Emsav rak ar Stad-se en em gavfe e dislavar gant ar boblañs a zistaolfe anezhi deiz pe zeiz evel ur c'horf estren ;

- an dislavar ne c'hell bezañ lamet nemet a nebeudoù ha war hir dermen dre hanterouriezh ul ledemsav o c'hoari ur roll emskiantekaat broadel ;

- tonkad natur al ledemsav ur wech m'en deus atizet e Breizh an emskiant vroadel eo en em deuziñ tamm ha tamm en .. Emsav war-bouez degemer an aotrouniezh speredel anezhañ ;

- roll an Emsav eo er c'hontrol krouiñ ar gevredigezh vrezhon dre ensavioù liesseurt ; ar gevredigezh vrezhon-se eo a dreuzfurmo ar stad vreizhat evit e lakaat da glotañ gant stuz nevez ar bobl vrezhon krouet gant ar gevredigezh vrezhon end-eeun. Dre an hent hir-se hepken e c'hell dislavar ar yezh hag ar sevenadur bezañ lamet en diwezh.

H.K.

(War an niverenn a zeu e vo embannet trede pennad ar rummad-mañ :
DISLAVAR AN DISPAC'H hag AR STAD)

A N E M S A V H A G A R Y E Z H

g a n t P O L K A L V E Z

Prezegenn distaget e K.E.A.V.

1971, e Kerhan

Embann a reomp amañ da heul skrid ur brezegenn bet distaget gant Pol Kalvez, kelenner e S.A.E., e-pad K.E.A.V. diwezhañ e Kerhan. Kavout a ra deomp ez eo ar skrid-mañ talvoudus bras ha kentelius meurbet e meur a geñver. Darn a vo souezhet ha marteze un tamm tregaset o verzout e ra Pol Kalvez ur "geto" eus an Emsav. E gwirionez, keal ar geto a rank bezañ studiet ha spisaet er gevredigezh diempret a zo, dre natur, hini ar bed arnevez greantel, koulz er reter hag er c'hornog. Azon ur gevredigezh a zo o vont da vruzhun ez eo. E devoud e c'heller arvestiñ ouzh emled ar "getoerezh" penn-da-benn d'ar gevredigezh **kornogat**, emled dic'houzvez d'ar re a gemer perzh en argerzh-mañ zoken ; hep komz eus an hippied e c'heller menegiñ ar stolloù relijiel hengounelour hag arnevezelour e diabarzh an Iliz, ar stolloù kleizelour liesseurt e diabarzh an emsav sokialour h.a.

Moarvat e vo komzet c'hoazh eus ar "geto emsavel" er gelaouenn-mañ. Adal bremañ avat eo dav deomp gouzout ne oufe ar geto bezañ un diskoulm d'hor c'hudennoù ; kavout a ra deomp e gwirionez ned eo ar geto peurvuiañ nemet pazenn diwezhañ dizeriadur ur gevredigezh, nemet e vefe meizet gant ar stourmerion evel loc'hva un aloubadur. Ne vern peanos, amlegoù dreistvevañ ur geto ha pergen hini an Emsav a zlefe bezañ studiet a-zevri, a-geñver d'ur perzhiekadur - faltaziek alies - en un istor hollvedel.

An diskoulmoù pleustrek kinniget gant Pol Kalvez a zellez ivez bezañ studiet. Kouviañ a ran lennerion IMBOURC'H eta da gas o evezhiadennoù e ser ar pennad pouezus-mañ. Spi am eus e teuy en dro-mañ muioc'h a genskriverion da zisplegañ o ali eget n'eus bet e ser danevellskrid ar vaourion ha na hañval ket bezañ entanet an Emsaverion dre vras.

Y.O.

Goulennet ez eus bet ouzhin gant kevredigezh an deska-
durezh nevez displegañ un nebeut mennozioù a-zivout ar skol
e brezhoneg.

Gwelout a raimp : ar pezh a zo bet graet betek-hen,
- perak ur skol e brezhoneg
- penaos.

Moarvat ez eus bet gwechall skolioù ma veze desket e
yezh ar vro kement danvez gouiziegezh anavezet ; e Breizh-
Veur, a-raok an divroadeg, gant an Drouized, ar File, hag ar
Varzhed, hag e Breizh-Izel er manatioù hag e lezioù an Dier-
ned. Padout a rae ar skoliatañ e-doug daouzek vloaz a-wechoù,
hag e veze desket dek miliadoù a werzennoù dindan eñvor ; (pal
kentañ ar gwerzaouiñ zo bet emichañs reiñ tu da vevout dan-
vez ar gelennadurezh pa oa ken rouez al levrioù). Kelennet
e veze yezh, lennegezh, danevallouriezh, gwiraouriezh, bre-
zelouriezh, h.a. Ne gomzan ket eus Skol ar gêr ma veze des-
ket kanaouennoù ha kontadennoù d'ar vugale.

E brezhoneg penn-da-benn e veze gwelet ar bed, ar bed
keltiek hag ivez ar bed estren.

Ar bed estren nesañ oa ar bed roman a ziskouezas bezañ
galloudusoc'h marteze, hogen dreist-holl gwelloc'h da veno
hon hendadoù peogwir e tegemerjont a-nebeudoù e-touez traoù
all, ar reizhiad kelenn anezhañ, skritur, levrioù, danveziou-
studi ha yezh. Ouzhpenn ar bed roman, e tegemeras aes a-walc'h
hon hendadoù, dre ma hañvale gwelloc'h dezho, ar bed kristen
a oa ivez gwisket e latin. Al latin a zeuas da vezañ yezh ar
skol. Anat eo kement-se diouzh an dielloù, pegen marellet
bennak ez eo ar re-mañ a spisc'herioù brezhonek.

Moarvat e tiskbuez ar spisc'herioù-se e oa pinvidik hag
uhel an henvrezhoneg. Diskouez a reont dreist-holl ne oa ar
brezhoneg nemet ur mevel e palez ar sevenadur latin.

Gwir eo e oa kont evel-se e pep bro ar C'hornog, ha ma
oa da gantañ, al latin yezh an alouber, e teuas buan da yezh
ar ouiziegezh etrevroadel, betek en hon amzer. Aesaat a rafe
koulskoude diskar personelezh ar Vrezhoneg ha, dre-se, an
enteuziñ er bed gall adalek dibenn ar Grennamzer.

Sant Erwan, da skouer, a welomp o vont da Baris ha da
Orleans war studioù n'oa lec'h ebet enno, d'e yezh dezhañ e-
unan, nemet e stumm gwerzennouigoù e-giz re Ivonet Omnes e
ve, ouzh marz ur boelladenn. Evel-se ez a bremañ studierion
Vro-C'hall da skouer, da skolioù-meur Amerika : diougan an
diskar da zont en o bro c'henidik.

Rak, d'am meno, "mar deo bet trec'het Breizh er brezeli-
lioù bras", mar deo bet trec'het e Sant-Albin e 1488 hag e
Gwened e 1532, eo dre ma oa bet diskaret - ne lavaran ket ar
garantez-vro - met ar vroadelezh, ar personelezh, dre lati-
nekadur ar skol hag animplij ar brezhoneg er vuhez hiniennel
broadel hag hollvedel: ar bobl ne oant ket "tud" met parre-
zianiz verrwel, ar renerien a wele hag a brize pinvidigez-
hioù danvezel ha speredel ar bed holl, met re ~~brezhoneg~~ e cant

evit o fiaouañ e gwirionez dre o adverañ en o yezh dezho o-unan, hag aesoc'h e kavent degemerout gantañ digant an estren diwar gouest o ene hag o douarou. Hag int politikerien sañset; n'o doa ket mēizet ar pezh a veizas roue o amezeion, Frañsez kentañ a Vro-C'hall pa lakaas ar galleg e-lec'h al latin da yezh-stad, ha da heñl, da yezh-skol ; hevelep politikererezh broadel gall zo bet dalc'het dezhañ betek en hor amzer gant lezennoù ar c'hConvention Nationale e 1793, lezennoù Jules Ferry e 1883, diskleriadennoù De Monzie ha Pompidou nevez'zo.

Mar menegan darvoudoù istorel estren d'hor bro eo, da gentañ, dre m'eo bet gwasket enno'hor broadelezh, ha dreist-holl dre ma tiskouezont da begen pouezuz eo bet sellet e lec'hall yezh an deskadurezh evit difenn ar vroadelezh, ar vroad hag ar vro.

E Breizh avat, den ebet ne welas talvoudegezh politikel ar yezh. Nemet en ugentvet kantved, hepken, Tangi Malmanche, Frañsez Vallée, ha dreist-holl Meven Mordiern ha Roparz Hemon. Adlennit Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh ha Talar an Hoc'h.

Ouzhpenn gwelout, e "rejont" skolioù hollvrezhonek. E Sant-Brieg, ur wech, div wech, teir gwech ar sizhun, e teue Mordiern e ti Vallée, pep hini o kelenn d'egile, oc'h advrezhonekaat ar pezh a ouient hag ar pezh a zesrent eus ar bed bras. Vallée a oa mestr war ar yezh ; Mordiern war ar Skiantoù. Ouzhpenn kelennerion ha skolidi e oant ivez embannerion levrioù-skol, levrioù ledañ-deskadurezh oal ma lavarent, (Tredanouriezh ; fiziañs-skeudennerezh ; ar skriverezh ; ar marc'h-houarn ; gerioù ar yezhadur ; luc'hskeudennerezh ; douaroniezh ; an ijin-tan ; ar stlejerezh-tren, an troellrodoù ; ar sonskriverezh ; moulezezh ha skeudennerezh al levrioù hag ar c'hazetennoù ; ar c'harr-tan ; an nijerezh ; gerriadur ar brederouriezh, an denoniezh, an dudoniezh, istor ar sevenadur, ar steredoniezh, an oablouriezh, an douaroniezh, an henouennoniezh, al louzawouriezh, al loenoniezh, Istor ar Bed).

Ne oant nemet daou. E Roazhon avat, e-pad ar brezel, e voe savet ur skol evit an holl : skol uhel Emil Ernod, hag e Plistin ur skol izel gant Kerlann e-lec'h ma veze kelennet pep tra e brezhoneg. Serret e voent e 1944, gant ar G'hal-laoued. Hogen, kreñvoc'h eget ar re-mañ, ar mennoz a wiskas ur stumm all : kerkent ha 1947 ha betek hen ez eus bet e K.E.A.V., pempdegtez bep bloaz, ur wir skol hollvrezhoneg. Ur skol-Hañv eo avat, da lavarout eo ur skol graet graet e-pad an ehan-skol, goude ar skol-all. An Ao. Ar C'halvez, eñ, a fellas dezhañ brezhonekaat ar skol c'hallek adalek 1957. E brezhoneg e veze kelennet, yezh, Istor Breizh, Douaroniezh Breizh ha broioù all ar bed, Skiantoù, Lezenn an hent, Jediñ, Relijion, e skol Sant-Erwan, Ploueg-ar-mor. Hogen diaes e oa moarvat kenderc'hel gant ur skol e brezhoneg e diabarzh ar framm gall.

Neuze, Kevredigezh an Deskadurezh Nevez a oa bet savet evit harpañ skol Sant-Erwan, a roas bod d'ur Strollad distag S.A.D.E.D. , a oa e bal " aozañ e Breizh un deskadurezh kevatal d'an hini a vez roet d'ar yaouankiz e kement bro sevenaet a zo... gant kelennerion... war holl skourroù ar ouiziegezh a-vremañ... war an holl zanvezioù-skol... " (en doare) da "ober e brezhoneg ar studioù a c'heller ober e-barzh forzh petore kelenndi Europa ". Kenderc'hel a ra S.A.D.E.D. abaoe 1963, da embann kentelioù war zanvezioù liesseurt Kizik, Kimmiezh, Jedoniezh, Bevoniezh, Douaroniezh, Lennegezh vrezhonek, Istor Vreizh, Krennvrezhoneg, hag ivez nevez'zo, Politikouriezh, hag Armerzhouriezh. Ur skol dre lizher eo, a glask reiñ un deskadurezh hollvreizhek gant 10 pe 20 kentel bep bloaz da skolidi a zegemer a-hend all 20 kentel bep sizhun e galleg.

Ur skol kalz klokoc'h dre ma vez graet e lec'h ar skol c'hallek zo bet hag a vez c'hoazh en un tiegezh bennak ma vez kelennet ar vugale er gêr e brezhoneg betek an oad da vont er c'hwec'hvet klas gall.

Ur skol nevez zo o paouez diwan e Roazhon ; re yaouank eo c'hoazh evit ma vefe da lavarout tra diwar he fenn nemet ez eus bet prientet enni e korf ar bloavezh-mañ 36 kentel war douarouriezh, 40 war ar jedoniezh, 30 war an douaroniezh (broioù Europa nemet Breizh) 10 war Istor Europa, Breizh e-barzh, 20 war al latin, 50 war ar gresianeg, 120 war ar saozneg ha 300 war ar brezhoneg.

Setu dre vras istor ar skol e Breizh : 10 kantved a skol e brezhoneg gant an drouized, file ha barzhed, 10 kantved a skol e yezh an' estren, ha ni bremañ brezhonegerien a-tav hag o klask lemel diwar hor chouk ar yev estren, dre veizañ da gentañ perak e rankomp krouiñ en hon touez ur skol en hor yezh ha war bep tachenn eus gouiziegezh mab-den.

Perak ur skol e brezhoneg penn-da-benn e Breizh ?

Iskiasat goulenn ! Ha padal. An Diberder a skrive da Venven Mordiern " Faire du Breton ma langue ! Cela équivaudrait pour moi à descendre au niveau d'une variété européenne de Canaque. Merci bien. A d'autres ! Au fond du jardin les poireaux ! " (Lakaat ar Brezhoneg da yezh din, an dra-se a vije kement ha d'eskenn da live ur meuriad europat kanakheñvel. Trugarez ! Mat evit ar re all ! Ar pour e traoñ al liorz !) Un all, beleg e bro-Wened, m'am eus soñj mat, a gave mat ar brezhoneg evit al lennegezh, met ket evit ar skiantoù. Ha sur on siwazh e vefe kavet kalz tud a-du gant hollvrezhonekaat ar skol, met en dazont pa vo bet dieubet ar vro, eleze, m'eus aon pa vo mui a Vrezhonegerien. Ha neuze , peseurt bro a vo dieubet, Breizh pe ur "Bretagne" bennak.

Daoust m'eo anat deomp-ni, e tle pep bro kaout he skolioù, eo mat kennerzhañ hor mennozioù gant un nebeut prederadennoù.

Da gentañ e kav din n'eo ket a-walc'h kelenn ar yezh Kembreiz evel Cwen Morgan Edwards da skouer a veizas mat, ne oa ket a-walc'h kelenn ar yezh evel danvez-studi hag e oa ret hec'h implij da yezh deskiñ.

Den ebet ne gemer un hent a zo trouc'het kant metr pelloc'h. Deskiñ elfennoù ar yezh zo mat ha ret zoken ! Hogen da c'houde ? Dav eo kaout un hent hir da ginnig d'ar re a grog da zeskiñ brezhoneg hag un hent plaen hag aes. Pe e soñjint ne servij da netra, ha ne gas da neblec'h. Lu eo lavarout : " Deskit brezhoneg hag e viot gouest da lenn istorioù plijus Al Liamm ", pe : " deskit brezhoneg evit bezañ aotreet da dremen pemzegtez e baradozig Kamp ar Vrezhonegerion". Ar pezh zo da lavarout mar domp tud sirius eo : "Deskit brezhoneg evit bezañ "tud" e brezhoneg, keodedourion ar bed, hep koll netra eus ho personelezh vreizhat, ar c'hontrol eo. Bezit tud e brezhoneg e-lec'h bezañ tud e galleg. Bezit tud e brezhoneg hag e viot dieubet diouzh ar C'hallaoued. Bezañ tud setu ur pal !

" Ur yezh desket dre laer, gant mezh, ne c'hell degas korvo meiz ebet d'an den" eme Y. Olier en e envorennoù. Setu perak.

Setu perak e sellan-me ivez ouzh ar skol a reomp " da noz, da sul, ur wech ar sizhun, e-pad an ehan-skol, evel koulz ha netra, rak ne gas da neblec'h evit ar bras eus an dud. Petra eo deut da vezañ ar miliadoù a dud o deus kroget da zeskiñ brezhoneg, ur wech tizhet ganto live an Trec'h kentañ ? Ha pet anezho zo ast betek an Trec'h kentañ ? " Elise Kemper " a lennan e Deizlevr Y. Olier " , e oa 170 skoliad e 1944 o teskiñ ar yezh ". Peadra bamiñ pe c'hoarzhin ? E keit-se ez oa dek miliadoù o teskiñ galleg. Pet eus ar re-se zo brezhonegerion hiziv ? Amzer gollet, strivoù ha strivoù en aner. E pep lec'h ez a war-raok bremañ ar skolioù Brezhoneg, ha gwell a se ! Loc'het-kaer eo ar gad war c'achenn ar c'helenn brezhoneg, loc'het hepken avat pa soñjer e feur-niver bihan ar skolidi (unan diwar gant marteze), e feurniver an eurioù-skol.

Petra soñjal dreist-holl eus an eurioù niverus kaset e-pad 10 pe 20 vloaz o kelenn pep tra a-hend-all e galleg.

Rak, o kelenn ar brezhoneg, evel-da reomp, ha daoust pegen ret e vefe, eo war-dro ar brezhoneg, war-dro an Istor, war-dro al Lennegezh e reomp. Ar Yezh, an Istor, al Lennegezh a vez kinniget d'ar skolidi evel traoù da berc'hennañ, traoù da garout, traoù da azeuliñ evel idoloù (1).

Ur yezh n'eo nag un dra, nag ur boud, nag un idol ; ur yezh n'eo netra nemet an den e-unan o komz, o lavarout ar pezh ez eo e-kenver ar pezh n'eo ket. N'eo ket un dra, un ober eo. N'eo ket evit bezañ perc'hennet, evit bezañ graet eo.

Ur yezh estren a c'hell bezañ un danvez studi. Ur yezh vreadel, yezh an den, yezh ar studier, zo da gentañ ur benveg studi, ur benveg da reiñ e stumm dioutañ e-unan d'ar bed. Ar gwellañ studioù war ur yezh a vez graet gant estrenien alies.

(1) Hag int-i eo a zo e riskl da vezañ perc'hennet gant an danvez studi a vourront ennañ betek dilezel pep oberenn denel all.

Keit ha ma vo desket brezhoneg da c'hal-
legerien ar vro-mañ evel ma tesker saozneg dezho, e chomo
ar brezhoneg ur yezh ken estren dezho ha n'eo ar saozneg de-
zho. Ar yezh a vo . . . o hini bepred eo an hini a welont ar
bed drezi : ar galleg, zoken mar deskont ar brezhoneg e bre-
zhoneg, rak e saozneg ivez e vez desket saozneg bremañ.

Kentañ tra d'ober a-benn deskiñ brezhoneg evel yezh bro-
adel, zo tremen hep ar galleg a-hend-all, dizeskiñ ar galleg,,
diverkañ ar galleg diwar hor spered evel ma tiverker un des-
tenn diwar un vandenn vagnetek. Lennomp hag azlennomp pennad
Roparz Hemon e B.A. Mezheven 1925, a-enep ar gelennadurezh
divyezhek. " Evel Breizhiz e tleomp tremen hep ar galleg. Ar
galleg en hor skolioù zo spered Bro-C'hall en hon touez. Ha
keit ha ma vo spered Bro-C'hall en hon touez e vo hor broa-
delezh en argoll... Ra vo graet skol d'ar vugale e brezhoneg
penn-da-benn... Ra falvezo da bep unan ac'hanomp dizeskiñ ar
galleg, stourm outañ e pep lec'h hag e pep amzer ".

Deskiñ saozneg, zoken kalz, ha mat, n'eo ket a-walc'h
evit dont da vezañ ur Saoz. Ret e vije ouzhpenn dilezel ar
yezh c'henidik. Ret e vije bevañ e saozneg penn-da-benn e-
vel ma ra ar Saozon. Perak e vije disheñvel evit ar brezho-
neg ? Pelloc'h ez in : lavarout a ran n'eus ket tu da zes-
kiñ ur yezh estren zoken hep ober ganti. Un undra eo deskiñ
ur yezh hag ober ganti, nemet un hititeg bennak e ve.

Setu ar pezh a skrive c'hoazh Roparz Hemon bloaz zo en
ABK " Goude lenn labour an Ao. Ar C'halvez Un cas de bilin-
guisme : le Pays de Galles, e kredan-me startoc'h eget bis-
koazh ez eo hent an divyezhegezh un hent fall : hent ar marv
evit ar yezh vroadel hag evit ar vroad. En aner e striv ur
vro vihan da virout he yezh ma ne striv ket war un dro da
argas diouti yezh an alouberien."

Argas ar galleg a rankomp, a-benn deskiñ ar brezhoneg
evel yezh vroadel.

Gouzout a ran koulz ha forzh piv eo diass ha dic'hallus
zoken argas ar galleg diwar hon tro. Met gouzout a ran ivez
e c'hellan hen argas diouzh va empenn, ha kement-se dre ober
gant ar brezhoneg hepken evit deskiñ traoù nevez pe addeskiñ
traoù kozh.

Evit deskiñ ur yezh n'eus ket gwelloc'h hent eget deskiñ
traoù all, bourrus kement hag ober, dre ar yezh-se end-eeun.
Lennet em eus e vez desket bremañ Alamaneg da skouer er sko-
lioù babiged ; n'eus ket a gentelioù-yezh ; met danvezhioù
'zo a vez desket war-eeun en alamaneg evel naturouriezh pe
douaroniezh.

Heñvel eo evit ar brezhoneg : daou zoare zo : pe deskiñ
yezhadur, geriadur, lennegezh hag Istor Vreizh, pe neuze des-
kiñ ar bed holl e brezhoneg. Gwelloc'h an eil zoare, re strizh,
re enk an hini kentañ ; deskiñ ar bed holl zo dellezek eus an
den ; deskiñ Breizh hepken zo reiñ da Vreizh ha d'ar brezho-
neg un dalvoudegezh hollek n'o deus ket mui. Deskiñ ar bed-
holl e galleg, ha Breizh hepken e brezhoneg, zo lakaat Breizh
er-maez eus ar vuhez. Hag ouzhpenn-se, penaos e c'hellfe ar
c'hoant anavezout Breizh, he yezh hag hec'h istor bezañ trec'h
en un den war ar c'hoant anavezout ar bed holl ?

Studiañ yezh, istor, lennegezh Vreizh zoken e brezhoneg, ma ne vezer ket brezhoneger a-hend-all zo o studiañ diouzh an diavaez evel ma c'hell ober ur Saoz pe ur Gall. Deskiñ pep tra e brezhoneg avat, deskiñ ar bed e brezhoneg, zo en em lakaat Brezhoneger e-kreiz ar Bed.

Ur benveg eo va yezh. Un danvez studi eo ar yezh estren. Ur benveg eo va yezh ; muioc'h c'hoazh, un ezel ac'hanon, ul darn ac'hanon. Un dra a-ziavaez eo ar yezh estren. Va yezh zo evel va brec'h pe va zeod (an hevelep ger eo e galleg).

"Me a drouc'ho va zeod em beg

Kent dizeskiñ ar brezhoneg " a gane Brizeug.

Ezhom ebet eus ul lu, nag eus strolladoù politikel mar n'eus netra da zifenn, mar n'eus ket ac'hanomp, mar n'eus ket eus Breizh. Ha n'eus ac'hanomp evel broad nemet e kement hag ez omp desheñvel diouzh an amezaten, n'eus ac'hanomp evel Breizhiz nemet ma vevomp penn-da-benn e brezhoneg. Bezomp disheñvel diouzh hor mistri hag e vezimp dieubet diouto. Pe-seurt gwir hon eus da c'houlenn hon dieubidigezh ma'z omp gallaoued, ma vevomp evel gallaoued ? Mar deo bet trec'het Breizh ha mar pleg Breizhiz bremañ da'r C'hallaoued eo dre ma'z eo bet fellet d'ar re-se bezañ heñvel ouzh ar re-mañ.

Emaon o paouez komz eus strolladoù politikel. Un diforc'h bras zo, d'am meno, etre adsevel ur vro hag urzhiañ ur vro. Urzhiañ ur vro : dibab un doare staderezh, (roueelezh, gwerinelezh, diktatoriezh), hag ur wech dibabet ar stumm-se dre vras, dibab c'hoazh dre ar munud an hentennoù gwellañ evit mad an holl, diazezañ ar melestradur-mañ-melestradur, ar skolioù-mañ-skolioù, hervez ar pennaennoù-mañ-pennaennoù, kement-se holl zo ober politikerezh, ober war-dro ur geoded diazezet, kemer an dud evel m'emaint endeo, plegañ ar stadrenerezh diouzh ar pezh ez int, diouzh ar pezh a fell dezho. Hogen pa n'eus hogos ken a vroadelezh p'emañ ar bobl o ti-roudennañ muioc'h-mui diouzh o Istor, evit roudennañ e Istor o amezaten, petra eo ar politikerezh nemet da gentañ genel a-nevez ar vroad, adkrouiñ an den e-unan ? Dre an diabarzh evel ur bugel adalek e vugaleaj, dre gemm yezh, yezh ar skol. Divroañ hon eus d'ober e gwirionez, evel pa'z ajemp da chom en Amerika da skouer. Ha petra vez graet d'an enbroidi : skol e yezh ar vro war bep tachenn, evel da vugale.

Tud o deus kredet ha tud a gred c'hoazh eo a-walc'h lenn ha deskiñ istor Breizh evit karout ar vro en doare da stourm d'he saveteiñ. Se zo ankounac'hañ ne lak ket un den e vuhez en arvar evit ar pezh en deus met hepken evit difenn ar pezh eo, lavarout a rajen "evit difenn e groc'hen". Deskomp istor Breizh er Skolioù hag e vo entanet ar Vretoned evit o bro ! Gwir bater ! Met ma ne vez ket bouetet an tan e varvo.

Desket ez eus bet istor ar vro da galz a vugale e Breizh. Entanet int bet. Hogen n'int ket deut da vezañ Breizhiz evit kelo-se. N'eo ket a-walc'h, trivliadiñ ouzh kurioù hon dia-raogerion evit bezañ mibien dezho pe neuze e teuje un Hititour da vezañ un Hititad. Ret eo mont kalz pelloc'h, kalz do-

noc'h, lakaat ar skolidi o-unan en Istor, lakaat anezho da vezañ ar pezh e oa o zadoù, embroidi en ur vro nevez estrenien e-keñver o amezeien.

A-viskoazh hon eus kredet eo war an harzoù e vez difennet ur vro. Gwelout a reomp bremañ e pelec'h siwazh e tremen harzoù Breizh : dre greiz kalon pep hini ac'hanomp, hag en hor c'halon e kreizig-kreiz hor boud emañ maez ar stourm. Ur stourm speredel ez eo. Diouzh teir hentenn e labour ar re o deus kemeret da bal dieubiñ ar vro:stourm ouzh ar C'hallaoued kendroc'hiñ ar boblañs dre an abostolerezh, ar bruderezh, sevel Breizh e kalonoù an dud. Unan hepken zo ret hag a vo ret atav : sevel Breizh e kalonoù an dud.

Huchal " Ar C'hallaoued er-maez ", pe " Mallozh ru da'r C'hallaoued " zo un dra. O c'has er-maez zo un dra all. Hag un dra all eo c'hoazh kas ar galleg er-maez. Kas ar C'hallaoued er-maez ne empleg ket ez aio kuit ar galleg ganto : gallegerien eo deuet Breizhiz da vezañ. Aet ar C'hallaoued kuit e chomo c'hoazh ar galleg. Aet ar galleg kuit da gentañ avat, penaos e c'hellfe chom ar C'hallaoued ? Adsevel ur vro vrezhoneger, kas ar C'hallaoued er-maez zo daou dra ; ne zeuio ket an eil diwar ar c'hentañ, dre ret, met ar c'hentañ diwar an eil. Ar pep retañ eo eta sevel pe gentoc'h kenderc'hel da sevel, war-lec'h Gwalarn, Skol Ober, S.A.D.E.D. ur vroad vrezhoneger. Kenderc'hel da vrezhonekaat penn-da-benn ar gevredigezh vrezhoneger nemeti, an Emsav brezhoneger hag e lakaat da greskiñ. Breizh a vo dieubet pa vo enni unyezherion wirion. A bep seurt broadoù ez eus war an douar : broadoù seizh kant milion a dud, ha broadoù dek mil a dud, broadoù pinvidik ha broadoù paour, broadoù gant douaroù bfas ha broadoù dizouar. Broadoù ez int holl. Met pep hini anezho zo heñvel e kement-mañ : estrenien eo ar re all evito. Ra vo ar C'hallaoued estrenien evidomp.

Bezañ breizhad zo, da gentañ, nac'h bezañ gall. Un ober eus an den e-unan e don e galon. Ha petra zo tostoc'h da galon an den eget ar yezh a intr ur stumm dioutañ e-unan en eztaolioù e voud, merzadoù, meizadoù, kealioù ha mennozioù ? Keit ha ma soñjer e galleg e vezer gall. Adalek ma soñjer e brezhoneg e vezer ur breizhad. Hogen penaos, evit ul lodenn vat, stummañ hag intrañ hor c'halon, hor spered e brezhoneg nemet en doare end-ecun m'eo bet graet e galleg, dre ar Skol hollvrezhoneg ?

E-pad pell amzer e kredis e oa ar stourm politikel (hini B.A. da skouer) diazez ha sichenn ar stourm sevenadurel. Tud zo a lavare din ne bade Gwalarn nemet dre ma oa B.A., P.N.B. h.a. a-dreñv. Bremañ e kav din e fazien.

E gwir ne c'hell ket ar stourm politikel pe gentoc'h ar stourm dieubiñ bezañ sichenn ar stourm sevenadurel : ar c'hontrol eo. Bez' e ranker BEZAN kent en em zifenn. Breizhiz, brezhonegerien a ranker BEZAN a-raok hen embann. Diskaret eo bet B.A. P.N.B. ha meur ensavadur politikel war o lerc'h, dre ma

oant stag ouzh kealiadoù politikel berrbad. Ma ne vije ket bet anezho e padje c'hoazh Gwalarn, ar Brezhoneg er Skol, Bleun-Brug, h. á. ha kresket e vijent.

Kalz stourmerien a oa e B.A. ha dreist-holl er P.N.B. Skubet int bet holl e 1944. Gouzañvet o deus kalz. Niverusik e oant, miliadoù. Pet o deus adkroget gant ar stourm ? Ar vrezhonegerion hepken pe dost, dre ma oa o stourm unan stag ouzh o buhezioù, dre ma stourmentevito o-unan, evit o ene, evit ar pezh e oant deut da vezañ, ha ne c'hellent ket mui distreiñ da C'hallaoued hep en em zistrujañ, pa stourme ar re all, ar c'hallegerien, evit ur vro na oa ket, enno, met en diavaez dezho, evel ur skeudenn gaer marteze met ur skeudenn evelato. N'em em garent ket o-unan o karout o bro. Ha dre n'en em garent o-unan a-hend all evel na ra pep den, e c'helljont dilezel ar stourm. Ar stourmerien "sevenadurel" ne c'hellent ket ehanañ da vezañ ar pezh e oant deut da vezañ gant kement a boan alies. Kement ha diskroc'henañ e vije bet. Heskinidigezh ebet n'eo bet evit freuzhañ o boudoù.

Ne lavarant ket eo fall ar pezh a ra ar Strolladoù politikel; lavarout a ran eo peuzaner o strivoù dre ma strivont er-maez eus Istor Breizh keit ha n'emaint ket o-unan e-barzh evel brezhogerien, keit ha n'int ket o-unan estrenien e Bro-C'hall.

Ne c'hell un den reiñ d'ar re all nemet ar reveur anezhañ e-unan. A-barzh reiñ e ranker kaout, a-barzh kaout e ranker bezañ. " Mar fell deoc'h" eme ar c'hefredour amerikad H. Thoreau, " Lakaat un den da vezañ eo fall ar pezh a ra, grit ar pezh zo mat c'hwí hoc'h unan. Ane eo klask gounit warnañ dre gomz ; ar pezh a welont e kred an dud : grit ma welint ".

Ar gudenn eo "bevañ e brezhoneg". Hogen petra eo bevañ e brezhoneg nemet ober pep tra e brezhoneg. Ha petra eo pep tra ? Ma vijen ur c'hlaser bara e vije skort a-walc'h va ezhommoù e-keñver yezh, hag ken aes e vije din ober e brezhoneg evel e galleg. Ma vijen ur c'houer kozh en ur pennti e vije ken aes all c'hoazh. Dre ma "savan" avat gant skeul ar gevredigezh e teu diaesoc'h diaes chom brezhoneger pe zilezel ar galleg. Perak ? Netra nemet peogwir eo dre an deskadurezh c'hallek on bet savet el lec'h m'emaon. M'am bije desket e brezhoneg kement tra am eus desket e galleg, e vije aesoc'h din ober e brezhoneg kement a ran e galleg.

Ur c'houer war e leve hag ur c'hlaser bara n'int ket dre ret tud dizek ; met distag ez int muioc'h diouzh ar gevredigezh c'halleger. Kement-mañ n'eo ket lavarout eo ret deomp mont holl da "hipied" vrezhoneger, daoust ma ne vefe ket fall marteze.

Klevet em eus lavarout : "Mar argasit ar galleg, ez en em lakait er-maez eus ar gevredigezh er mare-mañ e Breizh ; biken ne zesavin va bugale e brezhoneg. Estrenien e vijent en o bro".

Da c'houzout ez eus piv zo estren er vro-mañ, pe ar re a ra gant ar galleg pe ar re a ra gant ar brezhoneg. Ne vern an niver. Ha forzh penaos mar d'omp mennet da z'ieubiñ hor bro, da genderc'hel gant istor Breizh, ez omp mennet da reiñ d'ar brezhoneg ul lec'h bras dez pe z'ez. Koulz kregiñ diouzhtu.

Ouzhpenn-se, penaos e ra ar vicherourion c'hall a ya da labourat bemaez da Alamagn. Chom a reont gallaoued koulskoude, peogwir e soñjont e galleg, ha peogwir e tarempredont an aliesañ ma c'hellont gallegerien en o labour hag er-maez eus o labour, ha peogwir int bet stummet gant ar skol c'hall. Heñvel eo stad ar Vrezhonegerien evit ar mare. Labourat a reomp war h'or micher en estrenvro. Met bevañ a reomp hon-unan hag en Emsav, goude honer micher. Ur stad da dremen eo en holl vroioù suj. Met peogwir ez eus daou benn d'ar stad-se eo, ez eo ur stad da dremen. Lamit penn brezhoneger hor stad hag e kollomp pep broadelezh ha pep spi en dazont dieub.

Evel pep kevredigezh e tle an Emsav pourchas d'e izili peadra da vezañ gwelloc'h euz, gwelloc'h emsaver, da lavarout eo, da gentañ peadra d'en em sevel e rez ur vreizhadelezh klok.

Diforc'het em eus pep politikerezh strolladel ha kealia-
del, diouzh ar politikerezh-dieubiñ. An holl emsaverien brezhoneger a dle labourat a-gevred evit aesaat da bep hini anezh bezañ ur brezhoneger bepred. Hag evidon n'eus nemet ur politikerezh-dieubiñ, ar politikerezh emvrezhonekaat, rak ma ne vez ket dieubet an den, penaos e vo dieubet an dud ?

Gant an danvezelekaat unton hag unwisk oc'h en em ledañ e pep bro, e kemm buan neuz ar broadelezhioù. Er speredoù e chom an diforc'hoù hag en estaol ar speredoù, er yezhoù.

Ur skrivagner gall, A. Chamson, a skriv : "Evit ma c'hellfe tud en em dolpañ e kevredigezhioù bras pe vihan, e rankont bezañ liammet gant ur yezh hepken, da lavarout eo gant un undave d'ar bed". An holl ac'hanomp a verz an ezhomm eus ur gevredigezh vrezhoneger. Ne vo adsavet unan nemet dre ar yezh, an undave d'ar bed, ha ne vo unvan ar yezh nemet dre ar skol. Klemm a reer dre n'eo disurvanet an Emsaverion. Ar abeg a zo e derezioù liesseurt o anvedegezh eus ar yezh, e derezioù o bezañ Breizhiz. Gant ur skol hollvrehoneg doujus d' o mennozioù hinie: vel a-hend-all, e vefent adunanet.

Lennet em eus er gelaouen Emsav : "Tiegezhioù o vevañ e kêr a c'hell hiziv desevel ha skoliañ o bugale e brezhoneg hep o dilañsañ e-keñver ar bed ma vevont". Arabat kaout aon e vo kollet ar vrezhonegerien e-touez ar c'hallegerien. Nebeutoc'h nebeutañ eo broadel ar stuzegezh an danvezioù-bevañ. Goulenn ur beefsteak en ur snack gall n'eo ket diaes zoken evit unan na oa ket galleg. Den ebet ne vir ouzh ur c'hon-tour a gontañ e brezhoneg ur wech sanket en e benn n'eo ket e galleg met e brezhoneg eo skrivet kement s'f' pe niverenn a wel dirazañ.

Arabat kaout aon e vefemp estrenekaet rak hor pal eo, dres, ober ac'hanomp estrenien. Mar n'omp ket estrenien perak kregiñ da stourm ? Mat ivez eo bevañ e kêr evit liesaat an darrempredoù gant ar vrezhonegerion all. M'o dije ar yuzevien bevet war ar maez e-pad daou vil bloaz ne vije marteze ket a Israel hiziv. Gwir eo int bet sellet a-viskoazh gant ar re all evel estrenien ha bac'het en ur getto fetis ; met int-i o-unan en em vire en ur getto difetis dre o skolioù, o relijion, o boazioù, ha dreist-holl an emskiant eus an estren, ar goi. Ar Jipsianed ivez a vire ar brezhonezh gant an emskiant o deus eus an estren, ar gadjo. Tamall a reer a-wechoù d'an Emsaverien chom en ur getto. Piv a ra ar getto, piv a sav ar mogerioù en-dro deomp nemet ar c'hallegerion. Ne c'hellomp ket bevañ e galleg, pe n'eus mui ac'hanomp. Ha ma vevomp e brezhoneg e-kreiz ar bed gall ez en em lakaomp en ur getto. Ur vroad ez omp, pe n'omp ket ? Mat ! Pep bro zo ur getto.

Lavaret e vo : n'hoc'h ket ur vroad peogwir n'hoc'h eus ket a Stad. Ar ger-mañ troet diwar ar galleg a dalv stadrenerezh, gouarnamant, mererezh ; hogen talvezout a ra ivez "stad an traoù". An dud n'o deus ket gortozet e ve Stadrenerezhioù evit komz yezhoù disheñvel. Ha dre ma oa yezhoù disheñvel eo ez eus bet savet e pep bro stadrenerezhioù evit ober war-dro ur bern traoù estreget ar yezh. Pa grog ur gouarnamant d'ober war-dro ar yezh emañ war he diskar. Pa vezimp brezhonegerion, pa vezimp a-nevez ar vroad ez omp bet, e tarzho dre ret ur stadrenerezh dicuzh hon touez.

Diwar-benn ar getto setu peza a lennan gant G. Ar Menn e SturierBleim : " Ar Vretoned a glask bevañ evel Breizhiz a labour en un doare dispar evit Breizh rak en aergelc'h hebreek ar gettoioù eo e kavas Baratz ha kendrevicourion all Israel, ar c'hoant da adsevel o broad, hag an tiegezhioù brezhoneger ha breizhek eo a raio stourmerion Breizh da zont.

Setu perak eo dav skoazellañ Skol Sant Erwan Plouezeg.

A-henñ-all, e kredan eo dav lakaat un trouc'h, un islonk, etrezomp hag ar bed gall, d'an nebeutañ er pezh a zo noazus er sevenadur gall danvezelour evit gwriziennañ er sevenadur keltiek.

Moarvat e vo pismiget, abeget ha kunujennet an tiegezhioù a raio evel-se, lakaet da warlerc'hiet, hogen perzh an diaraogerien eo bezañ lakaet da sedion ha da dud warlerc'hiet".

Hogen, ur stadrenerezh hon eus endeo, e Paris ; Breizhiz zo e-barzh, kannaded hon eus, kuzulierien departamant ; a-du ez int holl gant ar brezhoneg, hen lavaret hag hen skrivet o deus. Petra a reont avat estreget goulenn, pediñ, aspediñ ? Ur c'huzulier departamant en deus neizet e pelec'h enañ an dalc'h : graet en deus e-unan gant ar brezhoneg er C'huzul.

Gouzout a ran e vije aesoc'h kaout skolioù hollvrezhoneg dindan ur stadrenerezh emren. Hogen n'eo ket antronoz gouel an Dieubidigezh e vo poent kregiñ da sevel programoù ha levrioù-skol ; d'ober skol ne lavaran ket.

Ret eo prientiñ adalek bremañ kement a vo ret da skolioù Breizh dieub. Pe e vo buan kemeret ar pleg da ganañ ar Bro-Gozh, e galleg, dirak ar Gwenn ha Du.

War bep tachenn ar ouiziegezh

Petra glasket va zud o vont e galleg ? Petra glasket an holl dud nemet dont er-naez eus o dierreadur, pinvidikaat, kreskiñ, noñt er-naez eus bed strizh o farrez, bezañ tud, keodedourion an Douar. Ha reizh e oa.

Ar pezh a oa direizh avat oa kemer an hent aesañ, lonkañ evel chas pe vagadelled boued daskiriet gant estrenien e latin pe e galleg, goulenn an aluzon e-lec'h labourat gant ar pezh o doa, gant ar yezh o doa gant pinvidigezhioù o bro. Aesoc'h e oa dont da labourat gant pinvidik eget sevel unan. Buanoc'h e vez lennet ul levr e galleg eget savet unan e brezhoneg.

Dacu zoare all ez eus : pe argas kenent tra estren diwar hon tro ha ren ur vuhez klos, gettoek, parreziek ; pe neuze, digeriñ hor prenester war ar bed bras, en tu all da harzoù Bro-C'hall, pennacuiñ e pep lec'h hag e pep amzer, en ur chom dieub, ar boued speredel, na varvomp gant an naon anezho.

Lavarat en eus e teue ar stuzegezh da vezañ hollvedel. Ober a reomp gant an hevelep binvioù hag ardivinkoù e pep lec'h ar bed. Hogen evit bezañ perc'hennet war hor binvioù hag ardivinkoù e rankomp reiñ un anv da bep hini anezho en hor yezh.

Anez eo int-i a laero diganeomp betek hon anv, betek hon ene.

Ha piv a roio anvioù brezhonek d'an traoù nemet ar re a vo bet er skol, ar re o devo ar sellad an hollekañ war ar bed.

Lom'h a vez etud hor pobl^{pa} c'houlennont ha pa glevont penaos e vez graet e brezhoneg eus an dra-mañ-tra. Uhelaet en em gav pep hini o verzout e c'heller lavarout en e yezh kenent tra a vez anvet e yezhoù all ar bed. Baniñ a reont dirak ar gerioù nevez evel na varent gwechall dirak ar gerioù gallek a zigore dirazo ur bed marzhus. " ... ne oa adsav ebet da Breizh " ene Y. Olier, nemet goude distrujañ ar marzhvoud gall; seurt labour distrujañ avat ne c'helle bezañ kaset da benn nemet gant brezhonegion bet sturmet end-eeun gant ar studioù klasel ".

Tizhet omp bet holl gant ar marzhvoud gall. Neuze eo ret terriñ ar breoù, digontamañ hor speredoù eus kement sturmadur gallek, dre adstummañ e brezhoneg - reiñ an anv zo perc'hennañ - kement gouiziegezh desket ganeomp er skolaj hep lezel hini ebet a-gostez. Diverkañ al lieten vagnetek gallek dre sonenrollañ un destenn vrezhoneg warni. Hor studioù eil derez zo da adober penn-da-benn. " An deskadurezh eil derez zo da adsevel e-touez ar vrezhonegerien " a skrive Y. Gourvez n'eus ket pell.

Da lavarout eo ar studioù denel, ar re a zeskeomp gwelout ar bed-a-bezh. "Bezañ hollvedel, ha pa ve divreizhat, gant ma vo e brezhoneg : setu pal lennegezh Walarn" a skrive R. Hemon e Kornog. War e lerc'h e kredfen lavarout : va bro n'eo ket Breizh hepken, mat ar bed a-bezh gwelet e brezhoneg.

Donoc'h a se e vo karantez-vro an hini en devo gwela-dennet ar bed a-bezh gant n'en devo dinac'het tra eus e ber-snonelezh. Talvoudusoc'h eo deskiñ ar bed e brezhoneg eget deskiñ tra pe tra diwar-benn Breizh ; talvoudus eo a-benn deskiñ ar yezh, talvoudus evit dont da vezañ Breizhiz.

Kement enaon o paouez lavarout a zo anat deoc'h pell'zo. Mar n'hon eus ket skolioù n'eo ket peogwir n'hon eus ket c'hoant da gaout anezho, met peogwir n'ouzomp ket penaos o sevel er stad m'emañ Breizh bremañ.

Penaos ?

Techet e vijen da lavarout : gremp da gentañ ha, da c'houde, e vo gwelet penaos. Koulskoude e kav din gouzout da nebeutañ penaos eo arabat ober.

Evel ma tle bezañ hollvedel, hollouiziegezhel, e tle bezañ ivez digor d'an holl. Distag e tle bezañ diouzh pep strollad politikel ha zoken diouzh pep stadrenezh. Penaos asantiñ bezañ skoliad dindan gelennerion a zo, dre lezenn, izili ur strollad strizh, pegen ledan bennak e ve an anv en deus kemeret. Ni Brezhoned n'omp ket evit gouzañv an enkadennoù ha speredel e vefent. Dremwelioù ledan ha didermen a fell dimp. Un doñjer eo dimp an hentoù strizh rak aon a vagomp e vefent dall. Ar skol a dle bezañ dieub. Arabat e vefe stag ouzh ur strollad. Arabat zoken e vefe stag ouzh Breizh nemet dre ar yezh. Ur skol hollvedel hag hollzenel e tle bezañ.

Ar skol e dalc'h ur strollad a glask "stummañ" ar speredoù, diouzh mennozioù ar pennstrollad. Klevet em eus kant gwech ; " Ar Vretoned n'int ket stummet, tud an Emsav n'int ket stummet, ar pezh a ra dicuer d'ar strollad-mañ-strollad zo ur gelennadurezh politikel. N'omp ket a-du ; rak gwir ha dlead pep den zo empenniñ kement a zo diavaez dezhañ hervez ha gant ar pezh ez eo eñ e-unan, anez chon ur bugel a-hed e vuhez. Ober ur gour eus ur bugel, setu pal an deskadurezh. Pal an deskadurezh n'eo ket plantañ mennozioù ar c'helenner e penn ar skolidi, met deskiñ deszho ober gant o galloudoù hiniennel. A-du ez on gant R. Hemon pa lak Donald Gerlaban da lavarout : " Ne glaskomp ket stummañ speredoù. O digeriñ ne lavaran ket ". Va mennoz a zo n'eo ket d'ur strollad politikel aozañ an Deskadurezh e brezhoneg, d'an holl Vrezhonegion eo. Pep hini a c'hell hag a dle, kinnig diskoulnoù d'ar gudenn.

Setu amañ un nebeut raktresoù an eus savet warlene a-rack kregiñ gant ar pezh a ran bremañ.

Da gentañ em boa hunvreet en ur skol hollvrezhoneg un tu bennak e Breizh, pe en Iwerzhon evit bugale an ensaverion. Ar gwellañ e vije en un doare. Koustañ a rafe ker ; koll a rafent moarvat ar goprou tiegezh. Desavet e vije ar vugale er-maez eus Breizh. Daoust ma'z eo aes a-walc'h beajiñ tramor. E-keñver deskadurezh ha bruderezh e vije dispar.

Mat e vije sevel ar skol-se e Breizh da gentañ netra nemet evit lakaat ar C'hallaoued d'he serriñ ha da goll o brud vat. Fur e vije prientiñ ur skol repu en Iwerzhon, pe e Breizh-Veur.

Un hunvre n'eo ken, 'n eus aon, nemet e vijemp neur a hini oc'h hunvreal an hevelep tra.

Soñjet en eus ivez mirout ar vugale er gêr ha kemer e-vito kentelioù dre lizher e galleg. Treiñ ar re-mañ e brezhoneg ; kelenn ar vugale e brezhoneg, ha treiñ poelladennoù brezhoneg e galleg en-dro evit kas d'ar skol dre lizher. An dra-mañ zo aes a-walc'h evit ar gerent o deus amzer, ha ne vije ket amzer gollet.

Ur raktres all an eus savet evit ur skol-abardaez. Etre 8 eur ha 10 eur abardaez bennez-korf ur bloavezh-skol ez eus tu da reiñ 180 kentel war ar Brezhoneg, 72 war ar jedoniezh, 72 war ar saozneg, 36 war al latin pe ur yezh all, 36 kentel war ar C'hembraeg, kenent-all war an iwerzhoneg, 36 war an douaroniezh, kement-all war an istor ha 72 war ar skiantoù. Ar gudenn zo labourat div eur dicuzh an noz bennez war-lec'h un devezhiad labour tenn. An eurioù-se ne dalvezont ket eurioù ar beure anat eo. Eveljust e c'hellfe ar skolidi diskuizhañ e-pad an deiz el lise. En ur ober c'hwec'h pe seizh vloaz e vije graet tro ar studioù eil derez evel ma vezont graet e Breizh e galleg, ha ne gav ket din e vije ur c'holl-amzer evit ar grennarded e-keñver o studioù.

D'an meno e tle ar skolioù bezañ savet er c'hêrioù ha n'eo ket war ar maez. Er c'hêrioù bras da gentañ, ha neuze er c'hêrioù-etre.

Skolioù dre gomz e vo ha n'eo ket dre lizher. Pouezus eo en ur gevredigezh war ziwan evel hon hini an darempredoù etre skoliad ha skolaer, koulz hag etre skolidi. Aesoc'h eo d'ar skoliad hag ivez d'ar c'helenner kenderc'hel da zont en ur skol dre gomz eget kenderc'hel da sevel poelladennoù e-unan.

Mat e vo kaout ur sal-skol gant un daol vras ha kado-rioù, un daol vras ha dreist-holl un daolenn-zu. N'eo ket ret kaout ur gador brezeg evit ar c'helenner, rak n'eo ket ret e vefe ur c'helenner. Skolidi ne lavaran ket. Ar pep pouezusañ zo raktres an envodoù rak broudet e vo ar skolidi n'eo ket gant hoal ar goprou tiegezh pe spi ur gopr uhel er vicher da zont (nemet e Breizh Dieub eveljust) met gant ar youl, sentiñ ouzh ur roll-engavioù resis. Arabat e vefe ar sal-skol ur sal-debriñ e ti unan eus ar skolidi, da skouer, rak ur fazi e vije samañ diaesterioù un tiegezh war ziaesterioù ar skol. Dieub a-grenn e tle bezañ ar skol.

Aes a-walc'h kavout ur sal. An amzer, avat, div eur bennez d'an nebeutañ, e pelec'h e vo kavet, e pegoulz e vo kemeret, skrapet, laeret ?

Ar pezh a gont dreist-holl eo dent d'ar skol bennez hep mank war digarez ebet. N'eus digarez ebet, rak n'eus netra pouezusoc'h evidomp eget bezañ tud e brezhoneg.

Ne gav ket din e vefe tu d'ober netra dindan nebeutoc'h eget div eur bemdez. Teir gwech muioc'h e reomp e yezh an estren. Arabat krediñ a-hend-all e vo diwar goust ar pezh a zesk ar vugale er skol c'hall, rak an hevelep danvezioù a vo studiet. Forzh penaos eo diogel :

1° ne vo graet netra hep aberzhiñ tra pe dra eus ar pezh a leugn endeo hon devezhioù.

2° n'eus netra er pezh a leugn hon devezhioù a dalvezfe kement, evidomp brezhonegerien, hag ober pe adober hor studioù en hor yezh.

Ha neuze prederiomp un tammig c'hoazh : Dlead ar gerent eo, evezhiañ ouzh studi o bugale. Penaos e reomp-ni bvit skoazellañ hor re war o studioù, penaos e reomp-ni brezhonegerion evit komz ganto eus ar pezh a ra danvez o dervezhioù-labour. Ar gerent c'halleger a c'hell emellout e studioù o bugale. Penaos henn ober, ni brezhonegerien, nemet dre studiañ hon unan e brezhoneg er pezh a ra hor bugale e galleg er skol. N'eo ket ken diaes-se. Diaes eo evit un den e-unan. Met meur a hini ez omp o kaout bugale en hevelep klas. Lakaomp e vije en hon touez kerent, bugale dezho er pevare klas. Ar program gall zo unvan a-walc'h eus ur skol d'eben. Rannomp etrezomp an danvezioù studi hag al levrioù skol. Savomp pep hini un droidigezh buan ha buan, hemañ douaroniezh Europa, henezh Istor, egile Jedoniezh, h.a. Lezomp kelennadur ar galleg a-gostez. Met miomp un eur bemdez d'an nebeutañ evit ar brezhoneg diouzh live ar c'hlas m'emañ hor bugale evel reizh. Un dornlevr ... so prest evit ar pevare klas. Mat e vefe sevel kevredigezhioù kerent bugale hervezh live ar re-mañ. Ret eo kaout al levrioù en a-raok eveljust, adalek bremañ ha kregiñ d'o lakaat e brezhoneg. Ne vo ket kalz a vugale e pep klas, ne vo ket ret stensilañ, a-walc'h e vo skeiñ un nebeut skouarnoù. Hag evel-se e c'hell ar gerent kendivizout gant o bugale war o studioù hep bezañ rediet da vont e galleg. Kentañ tra zo d'ober eo renabliñ an tiegezhioù a ra gant ar brezhoneg. N'int ket niverus. Ha strollañ ar gerent hervez ar c'hlasoù.

Bez ez eus brezhonegerion, ar re yaouank da skouer, a zo studierion pe a vev er-maez eus un tiegezh brezhoneger. Dezho eo ret en em vodañ bemdez gant brezhonegerien all hag adober da noz e brezhoneg ar studioù o deus graet e-pad an deiz e galleg. Da gentañ e vo dounaet an anaoudegezh o deus eus ar bed, ha da eil e vo digontamet o speredoù. Deut eo mare ar skol hed buhez. Arabat eta d'ar gerent lavarout n'int ket dedennet gant al labour-skol ; pe ez int kerent warlerc'hiet. Ret eo bezañ eus e amzer, ha zoken paotred a-raok.

Un adwel ne vo ken eus ar pezh a vo bet studiet e-pad an deiz, un adwel evit ar vugale, un adwel evit ar gerent eus ar pezh o deus desket gwechall hag en o buhez, un adwel ar studierion.

Savet ez eus bet e Roazhon ur stroñladig treiñ levrioù skol.

Ne glote ket dre ret devezh evit devezh ar pezh a vo en hon dornlevr met d'ar gerent e vo heuliañ ha dibab ar pen-
nadoù a glot gant ar pezh a vo bet gwelet er skol ha peur-
vuiañ e kloto ger evit ger.

Raktresoù all a c'hellfe bezañ savet, gwelloc'h eget
re ar Skol en Iwerzhon, pe ar Skol Abardaez pe ar ... er
gêr.

Diwan a raio dre ret, an doare-skol hon eus ezhomm pa
vo kadarnaet en hor reiz hag en hor youl ar rennoz e rankomp
bremañ mont pelloc'h eget an deskiñ brezhoneg evit henn des-
kiñ gwelloc'h, evit bezañ Breizhiz penn-kil-ha-troad hag e-
vit bezañ Tud, Keodedourion ar Bed e brezhoneg.

Oc'h ober evel-se ez adkavimp hengoun. zr gefredourion,
ar venec'h, an drouized a ziazezas hag a viras hor broad,
hag e kerzhimp neuze, e gwirionez, e roudenn adkavet hon
Istor.
